

**Kreizenn Imbourc'h Sturyezhouriezh  
S.A.D.E.D**

# **DAFAR 63**

**evit ar Geriadur Broadel**

**PREDER**

Kaier 51-52

Gwengolo-Here 1963

**Kreizenn Imbourc'h Sturyezhouriezh  
S.A.D.E.D**

**DAFAR 63**  
**evit ar Geriadur Broadel**

**PREDER**  
Kaier 51-52  
Gwengolo-Here 1963

K E N T N O T E N N O U

Emañ ar brezhoneg oc'h ober e gresk war dachenn ar c'uziegezh evel m'edo oc'h ober e gresk war dachenn al lennegezh tregont vloaz 'zo. Ha pa grog an termenoù kalvezel da aloubif an embannadurioù a veze gouestlet betek-henn d'ar yezh lennegel, n'eo ket re abred moarvat evit lakaat etre daouarn ar vrezhonegerion geriaoueg an taresadoù nevez difraostet.

Ken puilh avat eo an danvez ma ranker dibab. Setu perak ez eus bet dibabet, evit kregif, un tachad strizh, ha tannet diouti kement a c'helle bezef tennet. Ar 1700 ger displeget amañ a zeu aus 40 kentel gentañ SADED<sup>(1)</sup> - da lavarout eo eus ar pevar rummad : Douaroniezh, Fizik, Istor, Lennegezh, a rae programm 1963. Evel ma veneg an talbenn anezhef enta, dafar n'eus ken eus ar c'haier-mañ. A-benn 1970 e vo bet embannet, dindan rener- ezh ROPARZ HEMON, ar Geriadur Broadel, geriaoueg ar yezh voutin ha lennegel. O lakaat da anv war al labour-mañ Dafar evit ar Geriadur Broadel, n'eus ket fellet d'an nozerion kemer gwirioù war ar Geriadur Broadel, - enat eo n'o devez ket un darn vras aus an termenoù kalvezel o lec'h en ur geriadur-dorn, - hogen diskouez hepken o youl start da chom gwriziennet an hengoun Gwalarn.

Kreizennet-strizh a vez labour SADEO, hag a briz hevellep kreizennerezh e taol ar Strollad, etre frouezhioù all, ur yezh skiantel unvan. Preder an unvanif a renas ivez war savidigezh an Dafar.

Da zerc'hel unvan an doare-skrivañ ez eus bet kemeret da stalon geriadurioù ROPARZ HEMON, an daou c'heriadur brezhonek-gallek ha gallek-brezhonek, ar Geriadur Istorel hag ar roll gourfenngerioù bet embannet

(1) Strollad an Deskadurezh Eil Derezh. Pep disklariadur digent ar C'hreizennar, P. Calvez, Bréhec, Plouha, C. du N.

war Hor Yezh gant an titl : Geriou Etrevroadel. An nebeut kemmoù asantet dezho gant SADED ne da ket o braster en tu all da hini ar c'hemmoù munut a gaver etre ar pevar geriadur meneget. Evit an dizunvenderioù, dibaot ha dibouez dre eurt, a en em silas e kentelioù 'zo daoust da greizennadur ar c'helennerzh, o deus graet warno aozerion an Dafar an taol peurgrib rekis; - da skouer, war-lerc'h Douaroniezh GUILCHER-KERVELLA (Skol nn. 3, 1953), o devoa kelennerion an Douaroniezh skrivet greunid, ha da heul, laterid, hematid, h.a., pezh na glote ket gant ar Geriou Etrevroadel, ken e rankas an Dafar reizhañ : greunit, laterit, hematit.

Unvanet eo bet ar berradurioù diouzh ar re bonziet gant ROPARZ HEMON en o Raktres Geriadur Broadel (embannet dre follennoù gant Ar Bed Keltiek abaoe mae 1963).

Unvanet eo bet ivez, kement ha gallus, yezh an displegañ gerioù. Amañ avat ez eus bet aotreet d'an dafarerion muioc'h a lec'hed, o vezañ ma tiforc'h un tamm o danvez diouzh danvez ar Raktres. Kefveriet da skouer displegadur ar ger led er Raktres :

led g. ment linennek un dra, muzuliet a-dreuz-da-dreuz.

hag en Dafar :

led g., ment an egor, kefverek ouzh ar roud anadennel a-dreuz, eil ha diwezhañ ment ar gorredar, eil ment an ec'honder.

Anat eo e tremeno un deskard war ar yezh pe ul lenner lennegezh gant an displegadur kentañ, tra m'en devo ezhomm ar studier war ar jedoniezh, ar fizik, ar brederouriezh, eus an titouroù roet gant egile. Evit abegoù heñvel, ne ro ket an Dafar holl steroù pep ger: ar steroù boutin, anavezet mat, pa ne zegasont netra d'an diskleriadurioù kalvezel, a zo bet peurliesañ lezet er-maez.

o o o

o

D A F A R 1 9 6 3

E V I T

A R G E R I A D U R B R O A D E L

BERRADURIOU

ag.	anv-gwan	hv.	heñvelster
agv.	anv-gwan-verb	hvz.	hervez
Al.	alamaneg	Iv.	iverzoneg
as.	anv-stroll	Jed	jedonezh
bnk.	bennak	La.	latin
Bz.	brezhoneg	ls.	liester
k.	krenn- (sk. Brk. krennvrezhoneg)	Men	mentonezh
Kim	kimiezh	nd.	niver-dacu
Km.	kembraeg	Prd	prederouriezh
Kn.	kerneveg	prl.	peurliesañ
ko.	kontrol	Rs.	rusianeg
kv.	keñveriañ gant	rv.	rakverb
db.	diwar-benn	sk.	skouer
dh.	dreist-holl	sl.	sellout ouzh
Don	douaroniezh	Sz.	saczneg
Fiz	fizik	Trl	treloc'herezh
g.	anv gourel	u.	unanderenn
gg.	anv gwregel	ub.	unan bennak
Gl.	galleg	udb.	un dra bennak
gl.	ger-liammañ	un.	unander
h.	hen- (sk. Brh. henvrezhoneg)	v.	verb

Notenn.- Pa vez displeget meur a ster d'ur ger, e vez disrannet an displegadurioù diwar-bouez pikoù-skej (;).

aketat g., (Kim) ester en drenkenn aketek. En ijinerzh gwiadal e reer gant an aketatoù keluloz.

Adaoz ar Glad gg., adingaladur an douaroù perc'hennet.

a-darroz rv., serzh.

Adarzhrod gg., ledredenn 66° 33' su (keit diouzh Pennahel ar Su hag an Drovan diouzh ar C'heheder).

adkelc'houdenn gg., kreizenn uhrlwask en aergelc'h.

addanzen v. addanzeat, aozañ, darbar en-dro.

a-did rv., a-keñver divizout e-maez a bep redi hag a bep reolenn; 'al.: tidel.

adneuiziañ v., aozañ, stummañ en-dro.

adrann gg., lodenn diriégezh e bali ul lez-várn, h.a.

a-dreuzkroaz rv., o treuziñ a-serzh.

adstudad gg., ail aradennad veneziou a-kichen un all uheloc'h.

adverat v., reñf ur stumm, un doare nevez da.

advroadenn gg., broad nevez savet gant entrevidi ur vro all.

aerargadenn gg., tagadenn dre aer.

aerdreizher g., karr-nij beajourion.

aerdreizhidell gg., monedone ar marc'hadourezhioù, ar veajourion, h.a., dre an hentoù-nij.

aerrehentif v. & g., kaout darempredoù dre nij.

aerhent g., hent-nij, hent-aer.

aerhentadur g., darempredadur dre nij.

aerhental ag., db. an hentoù-aer.

aerlestr g., kement ijinnenn da zezougen dre nij.

aerlestraz gg., strollad aarlistri ur vro, h.a.

aerlestrel ag., db. an aarlistri.

aerlestrsaverezh g., ijinerezh ar sevel aerlistri.

aerlinenn gg., hent dibar boaziet gant kirri-nij ur gompagnonezh.

aerloc'hell gg., kement ijinenn o loc'hañ dre an aergalc'h.

aerraustladenn gg., kement kemm e stad an aergalc'h (avel, glav, gwrez, h.a.).

aerrouedad gg., strolled aerlinennoù.

aezhennsañ gg., kan evit kas an diraezhenn.

aezhennus ag., o kenderc'h aezhenn.

aezhidik ag., a dro aas en aezhenn.

a-gemparzh rv., dicuzh lezannoù ar gemparzhelzh.

a-gehbuez da, qant gl., a zo e bouez par da; a zo e bouezuster par da.

a-geroud da, qant gl., a zo e roud an hevelep hini ha.

a-gevreizh da, qant gl., a-gevreizh emañ un argemenn gant un argemenn all pa vez dezhi ur werzhad evit pep gwerzhad eus an argemenn all; sl.: kevreizhenn.

a-greiz qant (Mon), db. ul lun, a zo e greiz kenlec'h da greiz ul lun all.

a-ledred qant gl., a zo en hevelep ledred ha.

alpel ag., a-orin douarouriezhel gant an Alpoù.

aluminium g., (Al; elfenn nn. 13, tolz atomel : 26,98, douester : 2,7, teuzverk : 659°). Metal gwenn, skeañv, govalius, orjalennus, gwrez-ha tredanheren.

amazonel ag., db. an Amazon.

amdudek ag., tudek-dister.

amerikan ag. & g., ez-strizh db. ar Stadoù-Unanet; amerikat ag., amerikad g., db. ar rannved en he fezh.

amerikanhefvel ag., o tennañ d'an doareoù amerikan da vevañ, h.a.

amerindet ag., db. henvroiz Amerika, treuzanvet Indianed.

amezadur g. (kv. Br. am-, nes; amezeg), endro, kelc'hiadur.

amezek ag., (Jed) db. div elfenn eus ur steudad, a zo lerc'h-ouzh-lerc'h.

amqlet ag., hep aezament.

amhouarneq ag., db. ar metaloù estzeget an houarn.

amc'hwiliñ v. (kv. Km.: ymc'hwilio, Br.: c'hwiliñ), spisaat dre enklask,

da sk. lerc'hiad ha doareoù ur gwelad kailh.

amper g., (fiz) unanenn dredenread; bonunanenn ar reizhiad etrevroadel MKSA.

amplen g., sujidigezh e doare ampegadur.

ampegad g., doare na vije ket eus un dra heptañ.

ampegadur g., pezh a vez ampleget gant un dra, hevelep na vije ket eus an dra heptañ.

ampegañ v., kaout da ampegad.

amstu ag., dister e strujusted.

amvaneüs ag., amjastr bageal warnañ.

amzeriadur g., roll-labour emzeriadet.

anadenn gg., kement a ziraaz an emskiant; ster ledan : kement danvez-studi a zo d'ar skiantoù arnodel.

anadennel ag., db. an anadennoù er ster strizh; sk.: ar bed anadennel a zo ar bed evel ma teu anat deomp e kement ha ma vevomp ennañ.

anaperat ag., db. garvevion, ne vezont ket evit bevañ e-harz an aer.

anchal ag., risklus, argollus; sk.: klefved anchal.

anchaladur g., troioù risklus, avantur.

antrekit g., doare galou treut, enno nebeut korfoù aezhidik ha kalz karbon.

anzavad g., gwir anavezet gant ur Stad d'un den pe d'ur Stad all war un teread, ur ranndir, h.a. Er Reter-Pellañ, ranngerioù anavezet evel perc'henniezh Stadoù europat 'zo; sk.: an Anzavad Saoz.

aodbarzh g., lodenn ur vro stag ouzh an aod; hv.: arvor

Aostralia gg., anv graet eus ar strollad douaroniezhel : Aostralia, Gwinea Nevez, Zeland Nevez.

aotenn gg., (fiz) kengereg dir kalet harp ur c'her anezhañ ouzh ur c'horre-enn vetal kalet o reññ tu d'ul luskaladur dirim.

aotouriezh gg., studi an aodoù.

Aotrouniezh-Ag'hubiñ gg., galloud soudardel o ren war ur vro-estron aloubet.

ouravaleñ g., anv-rumm evit frouezh an doaread kitruz; hv.: agrumenn.

ozad g., traezenn, danvezenn o tont diwar un ebererezh; hv.: kenderc'had, danzead.

ozad-boued g., danvez-bevañs danzeat evit ar c'henwerzh.

Aozadur g., strollad gwazvaoù fiziet enno ur gefridiezh resis; sk.: un Aozadur dreistriezél eo Kumuniezh Europa ar Glac'h hag an Dêr.

aradus ag., a c'heller arat ha lakaat dindan c'honit.

arallouenn ag., a ouenn disheñvel.

arbennik ag. (kv. Km.: arbennig), aozet a-ratozh evit ur pal resis.

arbennigour g., den arroutet war ur gevrenn-studi; hv.: kevrennad.

ardivinkaot v., aveñ gant ardivinkoù.

ardroioù l., al lec'hioù tro-dro; hv.: trowardroioù.

arqant g., (Ag; elfenn nn. 47, tolz atomel : 107,86, douester : 10,5, teuzverk = 9602). Metal gwenn, gowelius hag orjalennus-kenan, ar gwellañ tredanheren a zo.

arqein, arqeinik, ag., db. ur c'horreenn, a zo balirek he c'hreiz.

arqeinik, db. ul linenn gamm a chom en he fezh en un tu d'an eunenn dreset dre forzh pehini eus he zuioù. Balegek e vez lavaret ar c'hern anezhi. Ko. argevek.

arqemmad g., diforc'h etre div werzhad kemeret gant un arqemmann.

arqemmadur g., db. un arqemmann, tremen eus ur werzhad d'un all.

arqemmel ag., db. ur c'hementad, a c'hell kemer meur a werzhad; hv.: war gemm, en arqemm.

arqemmen gg., kementad arqemmel.

arqev, arqevik ag., db. ur c'horreenn, a zo balirek he zro ha kleuz he c'hreiz.

arqilek ag., o vont war gil.

arqrec'h g., lodenn ur stêr lec'hiet war-du an andon.

arc'hant l., pinvidigezh e stumm moneiz.

arc'hanti g., ti ma prester, ma poster, ma eskemmer arc'hant; hv.: ti-bank.

arc'hantiel ag., db. an arc'hantioù, pe pezh a reer enno.

arc'hwel g., mont-en-dro, labour un ijinenn, un organenn.

arc'hwelat v., db. un ijinenn, un organenn, mont en dro, labourat.

arc'hwelerezh g., obererezh un organenn, un ijinenn, ur gwazva, h.a.

arlakaat v., savelañ ur c'heal, ur fed dre hent an dezastum, al lezennoù, ha ket dre hent an evezhiañ eoun.

arlakadenn gg., savadenn spered o kevreañ fedoù, lezennoù evel dezastumad=

ennoù diwar ur pennvon; sk.: arlakadenn ar gefverelezh.

arlakadennel, arlakadel ag., db. an arlakaat pe an arlakadennoù.

arlakadennour, arlakaour g., a oar diouzh an arlakaat pe an arlakadennoù; arbennigour war ur gevrenn arlakadennel eus ar ouiziegezh.

arlediañ, v. kreskiñ ec'honad, sk.: arlediañ a ra ar metalioù pa vezont tomet.

armerzh g., buhez arboellerezhel ur vro, h.a.

armerzhel ag., db. armerzh.

armerzhour g., a oar diouzh an armerzh.

arnacu g., lodenn ur stêr lec'hiet war-du an aber.

arnesaat v., tostaat ur muzul ouzh ar vent dik.

arnesad g., bresañ forc'had etre ar vent dik hag ar werzhad kavet dre vuzuliañ.

arnesadek ag., db. ur muzul, a zo ur forc'had etrezañ hag ar vent dik.

arouezidik ag., o verkañ resis, o titoureañ spis.

arvevad g., tra bev o vevañ diwar-goust un all.

arvevat ag., o vevañ diwar-goust un dra bev; arvil a reer eus ul loen arvevat, arblantenn a reer eus ur blantenn arvevat.

arvorad g., annazad an arvor.

Arzhrod gg., ledzedenn 66°33' norz (keit diouzh Pennahel an Norz hag an Drovan diouzh ar C'heheder).

arzhrodel ag., db. an Arzhrod, o-kefin an Arzhrod; sk.: ar Meurvor Arzhrodel.

asbest g., meinenn neudennek o c'haervezout eus silikat hidratet kalkiom ha magnezium, dientanus, dihedez.

askorad g. (kv. Kn.: ascor), (Don) kenderc'had dre unanenn c'horread; (fiz) keñver etre al labour sevenet gant un ijinenn hag al labour degaset dezhi.

askoridik ag., db. un doare gonit-douar, o klask tennañ ar muiañ frouezh diouzh ar bihanañ gorread douar.

a-spin rv., (Men) doare ul linenn o kejañ en ur poent gant ul linenn all hep he zreuzfiñ.

astennadur g., (Men) roud un eunenn traset en tu all d'ar penn anezhi.

astennidik ag., db. un doare-gonit o klask tennañ implij eus ar bresañ gorread douar.

a-steud rv., lerc'h-ouzh-lerc'h diouzh ul linenn.

astroc'hañ v., db. ul linenn, o tremen a-dreuz da linennoù all; hv.: treus-kiziat.

atalad g., (Jed) reollun o verkañ ur c'hañver a barder etre kementadoù anav ha dianav pe argemmel.

atalbouez g., pouez ur c'horf kavet dre embreg an atalbouezañ.

atalbouezañ v., doare pouezañ dre erlerc'hiañ pouezioù merket ouzh ar c'horf war eil pladenn ar ventel, eben o vezañ warni ur marvbouez.

atil g., gwiskad aradus an douer

atomôr gg. (kv. Rø. Atomgrad), kêr nevez savet, e kreiz ur gouelec'h prl. dre berzh an ijinerezh atomel.

a-unpezh rv., db. div elfenn d'elloc'hel, stag hevelep na c'hallont ket fihval an eil war eben.

avalpineged g., kerentiad gimnospermed aroueziet dre o frouezh strollet e stumm ur bikernenn.

aveadur g., kement tra rat da arc'hwelerezh un elfenn pe ur gevran eus an armerzh.

aveif v. aveat, bastaf kement tra rat da arc'hwelerezh un elfenn pe ur gevran eus an armerzh; sk.: aveif ur porzh-mor, aveif ijinerezh ponner ur vro.

a-vraswerzh rv., doare gwerzhañ a gementadoù brs.

azas ag. (kv. Brh.: cam-adas, Km.: addas), dereat, reizh (ouzh, diouzh).

azasaat v., reizhañ, dereadekaat (ouzh, diouzh).

azrannel ag., db. pe e-keñver an azrannañ pe azrannoù.

a-zremm, kenstur d'an dremmel; ko. a-zerc'h.

bakteri as. -enn, doaread garvevion unkellig, a zo en o zouezh un darnvras eus hadennoù ar c'hleñvedoù.

bageüs ag., db. ur stêr, a c'heller bageal warni.

baqud as. -enn, kellidoù, poulzoù.

baqudif v., kellidoù, poulzañ; sk.: lakaat patatez da vagudif.

balafis gg., pladenn ventel.

balagok ag., o neuziañ ur beg pe un dorzhell.

balzit g. (kv. Gl.: bauxite), kailh aluminiom.

banktaulenn gg., sl.: teulenn.

bannad g., (Men) bannad ur poent (war un seunenn, h.a.) a zo ar poent savelet gant ar serzhenn treset drezañ (war an seunenn, h.a.). Bannad ur regenn a zo ar regenn a c'hoarvez eus bannadoù ar poentoù anezhi.

bannañ v., (Men) savelañ ar bannad.

barnverk g., elfenn a ro an tu da briziañ ur perzh bennak; sk.: kenderc'had-bloaz an dir dre benn-annezad a zo deuet da vezañ evit ur Riez barn-verk he diorren greanterezhel.

barr-bevañ g., doare-bevañ sellet hevez implij pe get ar boazioù hag an aesterioù degaset gant ar c'halvezerezh modern.

barr-bividiqezh g., kv.: barr-bevañ.

barr-kenderc'h g., gouestoni da genderc'h; kenderc'h brasañ gallus.

barregezh gg., pinvidigezhioù ur vro, h.a., na vezont ket lakaet da dalv- ezout c'hoazh.

bazek ag., db. pe gant perzhioù ar bazennoù.

bazenn gg., kement danvezenn gimiek a zo evit degemerout ion H+ digant un drenkenn.

bec'h g., feur un danvezenn e-barzh ur c'henaoad; sk.: bec'h metal en ur gailhenn.

bellekaelour ag. & g., a laka rekis ar brezel dre reolenn.

bellour ag. & g., a gemer perzh er brezel.

benveadur g., strolled elfennoù treloc'hel frammet pe dastumet e sell eus ur pal, un taol-arnod da sk.

benvedijinenn gg., ijinenn o ren labour ur benveg.

benzen g., (Kim) lifvenn diliv dezhi ur c'hwez krefiv danvezet da zileizhañ an druzennoù, an teroù, ar rousinoù, h.a.; oberiet diwar an teroù-glaou.

berverek g., gwrezverk ma verz ur c'horf.

berzhus ag., a zo an tu d'ober berzh; hv. spletus, emsavus.

beuzif v., (Fiz) soubañ ur c'haled hevelep m'emañ peurc'hronnet gant al lifvenn.

bevergant g., (Hg; elfenn nn. 80, tolz atomel = 200,61, douester = 13,6, teuzverk = -39°, berverk = 357°). Metal lifvel nemetañ d'ar gwrez-verkoù ordinal.

bevestaloc g., louzoù da herzel ouzh diorreadur ar garvevion; hv.: anti-bioteg.

bevec'hnozad g., danvezenn diwar ec'haozidigezh un dra bev.

bevezadur g., ar bevezif; disoc'h ar bevezif.

bevezerezh g., obererezh bevezif.

bevezif v., distrujañ dre implijout.

bevezh rv., kv.: bewach.

bezuster g., pezh a c'hell bezañ.

bihandoues ag., bihan e zouester.

binviadur g., ar binviañ; ar binvioù a zo e-kezh unan.

binviañ v., pourchas binvioù da.

binvierezh g., obererezh binviañ.

binviet agv., binvioù en e gerz; binviet-mat, fall agv-ag., ur binviadur mat, fall en e gerz.

bivik ag.. db. an hin, broudus, bevaus.

biz g., (Fiz) nadozenn o zedek dirak un dremm dereziet e benvegoù-muzuliañ 'zo; hv.: steudenn.

bleinek ag.: silabenn v-, silabenn trededivezhañ.

bleuavelezh gg., hollad ar plantannoù o vevañ en ur vro, h.a.

bloc'had g., kementad danvez kalot, pouezek, hep neuz dibar.

boazif v., ober ez-voas gant un dra.

boazier ag. & 'g., neb a ra ez-voas gant un dra; sk.: boazierion an hent.

bokedouriezh gg., arz ar fichañ bokedoù.

bomm g., taol-berzh en armerzh; sk.: bomm an tireoul e Kanada goude 1950.

bon- rakger (Br.: bon-, ben- Km.: bon-), -diazet, pennañ.

bongenderc'had g., kenderc'had-diazet; sk.: da Argentina e ra dicuer c'hoazh bongenderc'hadoù an ijinerezh bras.

bonijinerezh g., ijinerezh ma vez diazezet ijinerezhioù all warnañ; sk.: pennañ bonijinerezh eo kenderc'h an dir.

bonnerzh g., elfenn eus ar bed sellet evel un diazet nevet anezhañ; sk.: kehelerezh bonnerzhioù an Natur.

bonoberierezh g., oberierezh pennañ en armerzh ur vro, h.a.; sk.: daou gant-ved 'zo e veze kenderc'h ha danzen ar gloan ur bonoberierezh ken plou-azel, ken kêrel.

bonverregezh gg., barregezh da ziazezañ warni ur bonijinerezh; sk.: ar glaou hag an heuar e vez bonverregezhioù.

bonventad gg., mentad kemzet da ziazeze en ur reizhiad mentawouriezhel; sk.: da vonventadoù ar reizhiad Giorgi ez eus bet dibabet an tolz, ar regad, an amzer, an tredanad.

bonvoued g., boued-diazet e bividigezh ur bebl, h.a.; sk.: bonvoued kouerion vManchouria eo ar gwinizh hag ar sorgo.

boreat ag., a zo en norz, hanternoz.

bouedour g., unan a ra war-dro bouedouriezh.

bouedouriezh gg., studi an danvezhioù bevañs, o galloud-magañ, o dasparzh-adur war an Douar, h.a.

bouedvirezezh g., ijinerezh ar boued-mir.

bouetadurezh gg., ar boued hag ar boueta dre vras.

braster g., (Men) regad ur sturiadell.

braswerzh gg., gwerzh, kenwerzh a gementadoù bras.

braswerzher g., kenwerzher o pladiñ gant kementadoù bras.

brec'h-loc'h gg., hed etre roud-gweredif un nerzh hag ahel ar c'horf ma wered warnañ.

breinereg gg., tachenn douar lazot distuz.

bresorez gg., lec'h ma oberier ar bir; hv.: breserdi.

brezeloniell ag., db. brezelonizh; savlec'h brezeloniell, lec'h dibabet evit an elfenn-mañ-elfenn eus an arme da heul ur studi brezeloniell.

brezelonizh gg., skiant ar brezel.

brezidik ag., taer, brouezek, feuls.

brezidiq g. brezidion, unan brezidik.

Brobenn gg., bro e penn travadennoù, un Impalaeriezh, h.a.

brokañ v., lakaat en arvar e-sell eus ur gonid brasoec'h.

brokerezh g., oberaterezh are'hant war werzhioù bank, yalc'h; sk.: brokerezh war an douaroù.

broezioù ls. u.: broezenn, tachennoù bro.

buallier g., prenestrig toulllet en ur pezh a wikefzra d'e skafvaat prl.

buallieret agv., toulllet ennan buallieroù.

buanaat v. & g., kamm an tizh dre unanenn-amzer; atalad :  $Y = LT^{-2}$ ; unanenn : ar metr-dre-silenn dre silenn, m/s<sup>2</sup>.

buorzhaouañ v., sl.: buorzhañ.

buntañ v., sl.: boutañ

bured gg., boutailh vihan, ledan a-walc'h he gouzoug, implijet evit arnodadennoù ar fizik, h.a.

burezh gg., aezhenn bet dre dommañ un danvezenn lifval; ijinenn dre vurezh, ijinenn o tennañ he gremm eus burezh an dour, anvet c'hoec'h ijinenn dre aezhenn-dour.

butuneg gg., plantadeg vutun.

K

kabokl g. -ed (Portugaleg : caboclo), koueried hîren warlerc'hiet Amazonia.

kailhea gg., gwelad kailh.

kaladur g., gwikefzra da zibunañ an neud; dre niver ar c'haladurioù e prizier displegadur an ijinezozh gwiedel.

kaled g., denvez er stad kalet.

kalet ag., unan eus tair stad anadennel an denvez, db. ar c'horfoù kevanstag o molekul, na gemazont ket stumm al listri o dalc'h.

kalorienn gg., unanenn wrezaed kozh, bepred implijet gant ar vouedourion; par eo da vilvedenn an unanenn atrevroadel, an dtermienn, elzeze d'ur vilitermienn.

kalvezad g., kenderc'had ar c'halvezerezh; tra diwar obererezh an den.

kalvezadel ag., db. ar c'halvezadoù; diwar obererezh an den; ko.: naturel.

kalvezañ v., oberiañ diouz hentenoù dibar diazezet war ar skiant hag ar pleustrezezh.

kalvezder g., tro galvezerezh; skourr kalvezerezh.

kalvezel ag., db. ar c'halvezañ pe ar c'halvezerezh.

kalvezalet agv., gwellaet dre skoazell ar c'halvezerezh.

kalvezelezh gg. perzh kalvezel.

kalvezerezh g., pleustrezezh diazezet war ar ouiziegezh.

kalvezour, kalvezer g., unan a oar ober diouz kalvezerezh.

kanikaze g. (Japaneg), "argader an ankou", soudard japanat en sil brezel-bed o vleniañ betek he fal un ijinenn-darzhañ.

karbedeg gg., hollad kirri ur vro, h.a.

karlestr g., bag evit dezougen ar marc'hadourezhioù; hv.: lestr-samm.

kas g., kementad denvez o verañ dre unanenn amzer. Mentad o c'hoarvezout eus rannad un tolz (M), pe un ec'honad (L<sup>3</sup>), pe ur pouez (MLT<sup>-2</sup>) dre un amzer (T); hervez an dro e komzer eus tolzkas (MT<sup>-1</sup>), ec'hon=gas (L<sup>3</sup>T<sup>-1</sup>), pouezkas (MLT<sup>-3</sup>).

kezel un atalad gg., pep hini eus an daou strollad a ya d'ober un atalad.

kealadur g., strollad kealioù o verkañ un emzalc'h, ur savboent, h.a.

kedamzeriañ v. (Yad), reizhenn-gedamzeriañ a reer eus ur reolenn yezhadur a c'houlenn ma klotfe amzerioù ar verboù en ur frazenn; sk.: me wel e teu, me wale e teue, gortoz a ra kan ma teuo.

kedalc'hourel ag., db. kedalc'houriezh.

kedalc'houriezh gg., reizhiad a gedvuhez diazezet war voutinaat ar madoù-kenderc'h.

kedlec'h g., lec'h-kejañ (db. an hentoù-houarn, h.a.)

kednerzh g., nerzh diorreet a-gevret gant unan pe reoù all war ur c'horf.

kedvuhez gg., buhez kevredigezhel.

Notenn.- Merkaf an diforc'h etre ken- ha ked- :  
kenvuhez, kenvevañ a dalvez pergen bevañ war un dro gant;  
kedvuhez a ra ouzhpenn anv eus ar c'hejañ etre ar genvuhezidi hag eus ar c'hudennoù da heul.

kedvuhez ag., db. kedvuhez.

keflusk g., rann oksidus ar profergoloù (danvezioù-leskiñ implijet er fuc'helloù), oksigen, ozon, o lakaat an trelusk da zevañ.

kefluskeriñ v., lakaat ur c'harr, ur vag, h.a., dre geflusker.

kefreder, kefredur g. (Brk.: kefreder, kefreden), unan a vez boas pe tuet da labourioù ar spered.

kefrederel ag., db. ar gefrederion; db. labourioù ar spered.

kehed ag., a zo e hed par (da), a-genhed (gant); sl.: keit.

kehent ag., db. daou lestr, h.a., o kaout digor an eil en egile.

kehentaveñ v. & g., aveñ ar c'hehenterezh.

kehenterezh g., an hentoù boaziet evit an darempredadurioù; daremprederezh.

kehentiñ v., db. daou lestr, h.a., kaout digor an eil en egile; kaout darempredoù.

keinvro g., lodenn an diabarzhvro e-keñver ul lec'h war an aod; sk.: keinvro ur porzh-mor.

keitad g. (kv. Br.: keitañ), gwerzhad bet dre rannañ sammad gwerzhadoù all dre an niver anezho; sk.: bezet an teir gwerzhad 6, 1, 5; ar werzhad  $\frac{6+1+5}{3} = 4$  a zo ar c'heited anezho.

keitat ag., perzh keitad.

keitwrezeg gg., taolenn geitwrezenoù ur vro, h.a.

keitwrezenn gg., pe linenn-geitwrez, linenn oc'h eren an holl boentoù dezho un hevelep gwrezverk.

kelec'henn gg., rann eus gorreenn ur ballenn dalc'het etre div blaennenn genstur; pep hini eus ar pemp rann treset war an Douar gant an Arzhrod, an Trovanoù hag an Adarzhrod.

kellavar g., lavar, doare-lavarout boutin etre.

keluloc g., danvezenn he reollun (C<sub>6</sub>H<sub>10</sub>O<sub>5</sub>)n a zo e golc'hoù kelligoù ar plant; ar c'hotoc'h hag ar paper a c'hoarvez eus keluloc hogos pur.

kemparzh g., kempenn parzhioù heñvel, par o mentoù, urzhiet heñvel. Kemparzh a c'hell bezañ e-keñver ur poent, un eunenn, ur blaennenn.

kemparzhder g., neuz kemparzhder.

kemparzhak ag., a zo kemparzh ennañ, pe etrezo.

kemparzhel ag., db. kemparzh.

kemparzhelazh gg., perzh kemparzhel.

kemparzhiañ, kemparzhiañ v., kempenn ez-kemparzhder; lakaat kemparzh e.

kemplezh ag., o c'hoarvezout eus meur a dra disheñvel, liesek.

kemplezh gg., frammad elfennoù disheñvel.

kemplezhder g., perzh kemplezh.

kenaoz gg., ar c'henaozañ; stad kenaozadur un dra.

kenaozad g., tra kenaozet.

kenaozadur g., ar c'henaozañ; disoc'h ar c'henaozañ.

kenaozañ v., ober un hollad diwar-bouez lodennoù disheñvel.

kenaozel ag., db. kenaozañ pe ar genaoz.

kenaozerezh g., obererezh kenaozañ.

kenarroud g., db. ur ger, ar gerioù, ar frazenn a zo an-dro dezhañ an un destenn.

kenbouez ag., a zo par e bouez, pe e bouezustar (da).

kenkizañ v. (kv. Br.: kenkiz, Km.: cainc), aloubiñ, kemer mestroni dre an diabarzh.

kenkizus ag., aloubus.

kendalc'hel (Jed) db. ur c'hementad na gemm ket e werzhad; ko.: argemmel.

kenderc'h, kenderc'hañ v., dedeular, produiñ.

kenderc'h g., pezh a vez kenderc'het, frouezh; ar c'henderc'hañ.

kenderc'had g., tra, danvez kenderc'het; kenderc'hadoù oberiet.

kenderc'hor, kenderc'hour g., unan a genderc'h.

kenderc'hlec'h g., lec'h ma vez kenderc'het.

kenderc'hug ag., a c'hell kenderc'hañ.

kenderc'husted gg., galloud kenderc'hañ.

kendouzad g., danvezenn vatalak diwar veskañ dre deuziñ daou vatal pe ur metal hag ur metaloid.

kendouzadur g., ar c'hendeuziñ; kenderc'h ar c'hendeuziñ.

kendeuzif v., teuzif a-gevret.

kendoug g., dilac'hiadur un anadenn a-gevret gant ar metoù he doug; sk.: tredan-kendoug, red-tredan kaset gant molekul o loc'haf erret outo an elektron.

kenec'honad (da -) ag., par e ec'honad (da -).

kenel gg. (Km.: cenedl), tud ur vroad selllet evel unded diouzh savboent ar ouenn, ar yezh, an istor, h.a.

kenfeur g., parder daou geñver; sk.:  $\frac{1}{2} = \frac{3}{6}$ .

kengeiañ v. (Men), db. linennoù, o tremen holl dre un hevelep poent.

kengeñvezh ag., db. sturiadelloù, a zo kenlec'h o genañvezhoù.

kengeñverioù l.(g.), (Jed) bezet daou gemetad a ha b, o c'hengeñverioù a zo :  $\frac{a}{b}$ ,  $\frac{b}{a}$ .

kengerer g., liestaleg a zo daou dal anezhaf liestuegi par ha kenstur o zuioù (dizaoù int anvet), hag an talioù all kensturiegi oc'h eren tuioù an dizaoù.

kenarog ag., db. nerzhoù, a zo dezho an hevelep poent-krog.

kenlec'h ag., (Men) a zo dik an hevelep lec'h (ha).

kenroud ag., db. nerzhoù, sturiadelloù, h.a., dezho an hevelep roud.

kennevid g., dazempredoù armerzhel.

kennevidañ v., kanut dazempredoù armerzhel.

kennerzh ag., a-serzh an eil war egile.

kensteg ag., stag an eil ouzh egile.

kenstrivus ag., db. nerzhoù, o weredif a-gevret war un hevelep reizhiad; nerzhoù kenstrivus a c'hell bezañ kengrog pe kenstur.

kenstur ag., db. div eeunenn, div blaenenn, kendalc'hañ an hed strezo.

kensturdaleg gg., kengerer a zo kensturiegi e zizaoù.

kensturie gg., pevarc'horn a zo kenstur e duioù enebek.

kensturienn gg., saunenn genstur d'unan all.

kensturolek ag., (Doz) db. ar c'hentañ hoalad.

kentidik ag., db. un doare-bevañ selllet evel nann-diorraet gant ar Gevre= dadoniezh.

kentidig g. kentidion l., den kentidik e zoare-bevañ pe -veizañ; sk.: kentidion Okeania.

kentiagram g., unanenn dolz, par d'ur gantvedenn c'hramm, cg; sl.: kilc=gramm.

kentimetr g., unanenn regad, par d'ur gantvedenn vetr, cm.

kentimetr karrez g. ag., unanenn c'horread, par da  $10^{-4}$  metr karrez,  $cm^2$ .

kentimetr difa g. ag., unanenn ec'honad, par da  $10^{-6}$  metr difa,  $cm^3$ .

kenvellet agv., graet a bezhoù diblegus staget kenetrezo, helloc'h e doareoù 'zo an eil re war ar re all.

keñver g., pezh ez eo un dra lakaet e kemmañ unan all; sk.: Einstein en deus spisaet keñver en danvez ouzh ar gramm; (Jed) dewerzhadur ur c'hementad dre e lakaat e kemmañ gant un all; sk.: keñver 2 ouzh 3 a zo  $\frac{2}{3}$ .

keñverek ag., a-dal; en ur reizhiad e vez lavaret keñverek an elfennoù a glot kenetrezo, prl. daou ha daou; sk.: bezet daou lun heñvel ABKO... ha A'B'K'D'..., ar poentoù A ha A', B ha B' h.a., a vo lavaret keñverek.

keñverel ag., termenet dre gemañ ouzh un dra all; sk.: loc'h keñverel ar stergann; (Jed) dewerzhadur dre gemañ ouzh ur c'hementad kemeret da vuzul; ar ster-mañ e lavarer kentoc'h : daveal.

keñverelezh gg., perzh keñverel; arlekadenn ar keñverelezh pe arlekadenn Einstein a gelenn a vez keñverel an eil re ouzh ar re all muzulioù an amzer ha muzulioù an ec'honder.

kenwerzhelañ v., treiñ e danvez kenwerzh.

keodadelezh gg., gwirioù o devez tud ur Riez evel keodedourion anezhi.

kêrel ag., db. kêr pe ar c'hêrioù.

kerc'h g. (kv. Km.: cyrch), rudadenn davit ur pal, argadadenn; sk.: kerc'h ur strollad bombezorion ouzh ur gêr.

kerc'hat v., mont davit, mont da glask; (Fiz) meizañ a reer ar pouez dre lakaat e penn-kont dedennerezh an Douar war gemet a zo en-dre dezhañ: "kerc'hat" a ra pep korf an Douar, pe, ez hallekoc'h, kerc'hat a ra pep korf ar re all ha kerc'hat a vez ganto.

kerc'hell gg., kement korf e kement ha ma c'hell kerc'hat ar re all ha bezañ kerc'hat ganto.

kêrrikan v., db. ur vro, kreskiñ niver pe vraster ar c'hêrioù; db. buhez ur boblañs, kemer doareoù kêr.

kerreizhat ag., db. ar struzh, a vez kavet er broioù hinad kerreizh.

kevala g. (Km. cyfalaf; kv. Km. alam), penndanvez, penn-arc'hant, kapital.

kevalael ag., db. kavala.

kevalaour ag., diouzh ar gevalacouriezh; sk.: framm kevalaour an armerzh;  
g.: dalc'hiañ ar gevalacouriezh.

kevalaourel ag., db. kevalacouriezh.

kevalacouriezh gg., (armerzh) doare armerzh ma vez kresket ar muiañ gwellañ ar madoù-kenderc'h; (keduhez) reizhiad a geduhez diazezet war labour-kenderc'h an niver bras ha perc'henniezh ar madoù-kenderc'h gant un niver bihan; (politikerezh) reizhiad politikel m'emañ ar galloud e dalc'h ar berc'hennad kevalaou.

kevan ag. (Brk.: coffan, Km.: cyfan), klok, anterin.

kevanaoz gg. (kv. Br.: kevan, aoz), danzen un danvezenn diwar hec'h elfennoù.

kevanaozel ag., db. kevanaoz; bet dre gevanaoz; ko.: naturel.

kevandalc'h g. (kv. Br.: kevan, dalc'h), (Fiz) mirout anterin; sk.: ur pola ne zegas ket a labour, treuzkos d'ra al labour degaset. Lavarout a reer a vez dalc'het kevan al labour : reolenn kevandalc'h al labour eo.

kevandir g. (kv. Br.: kevan, tir; Km.: cyfandir), douar-bras.

kevandirel ag., db. kevandir.

kevannezadur g., diazezedur, emziazezadur.

kevansteg ag., db. un hollad, hestag kenetrezo al lodennoù anezhañ.

kevanved g., bed klok drezañ e-unan.

kevelcurel ag., diwar-benn ar gevalacouriezh.

kevelouri, kevelerez, gg., embregerezh kevelcurel.

kevelouriezh gg., reizhiad a geduhez diazezet war ar berc'hentiezh prevez ha boutinaat al labour.

kevrat gg. (Br.: kev-, rat), emglev prl. lezennel etre daou pe lies den, daou pe lies kevredad, h.a.; kontrad.

kevread g., riez o c'hoarvezout eus stadoù emren.

kevreadel ag., db. kevread; dezhañ framm ur c'hevread.

kevreadelezh gg., perzh kevreadel; doare ur c'hevread.

kevreadelour g., dalc'hiañ ar gevreadelouriezh.

kevreadelouriezh gg., kelennadurezh o lakaat ar gevreadelezh da stumm gwellañ ar riezoù.

kevreizh ag. (Jed), kevreizh e vez un argemenn d'un argemenn all pa vez

dezhi ur warzhad evit pep gwerzhad eus an argemenn all.

kevreizhenn gg. (Jed), a reer eus al lezenn oc'h eren div argemenn a-gevreizh. Arpuez ar gevreizhenn a zo  $f; y = f(x)$  a lenner  $y$  zo kevreizhenn X, pe  $y$  zo kevreizh da X, pe c'hoazh : emañ y a-gevreizh gant X.

kevuniad g., stroladur ijinerzhioù emglokoù; sk.: mengleuzioù glaou ha houarn, metalouriezh, treloc'herezh.

kilogram g., unanenn dolz etrevroadel, tolz ur granenn blatin iridiet dezhi 99 mm sov ha 99 mm treuskizenn, kg. Gwezhañ e oa ar ger kilogram implijet evit un unanenn bouez; avel unanenn-dremen a vez degemeret c'hoazh, neuze gant an arvad : kilogram-pouez, hag an arouez : kgp; ar c'hilogram-pouez a zo pouez ur c'hilogram-tolz; par eo da 9,81 newton.

kilometr g., unanenn zegad, par da vil metr, km.

kilowat g., unanenn c'halloud, par va vil wat, kW.

kimiek ag., db. kimiezh.

kimiezh gg., studi kenaoz an danvezennoù hag o gweredoù; pennañ skourroù ar gimiezh a zo : kimiezh hollek, glaoukimiezh, meingimiezh, bev-gimiezh.

kivizh-, el. kivij-

klakennerezh g., glabouerezh, komzoù anez, flapennerezh.

klot ag., gant aezement.

kleurek ag.: silabenn g-, silabenn diwezhañ.

klom g., el. skoulm.

kloroform g., (Kim) devezad tric'hlorat ar metan,  $CHCl_3$ ; liñvenn danvezet er vezekniezh evel louzoù-disantaat.

klozarmerzh g., buhez arboallerezhel ur vro o vevañ warni hec'h-unan kuit a enporzhiañ hag a esporzhiañ.

klozarmerzh ag., o vevañ e klozarmerzh.

klozarmerzhel ag., db. klozarmerzh.

klud-ruilh g., logig e-barzh bendell ur rod enni ur galc'hennad boullou-igoù o tougen an ahal hag oc'h aesaat ar ruilhadur.

koadel ag., db. ar c'hoadoù; sk.: adran goadel.

koataer g., gounezur koadoù.

koataerezh g., gouniderezh ar c'hoadoù.

kobalt g., (Co; elfenn nn. 27, tolz atomel = 58,94, douester = 8,8, teuz=verk = 1530°). Metal gwenn heñval ouzh an nikel, kaletoc'h egetañ.

komunour ag., diouzh ar gomunouriezh; g., dalc'hiad ar gomunouriezh.

komunouriezh gg., kalennadurezh ha reizhiad politikel diazezet war voutinaat ar madoù; ar gomunouriezh varksat a strisha ar boutinaat d'ar madoù-kenderc'h hepken.

kondonad g., endalc'had kondon ur vro e danvezioù ijinerezh.

korean ag., db. bro-Gorea; g., annezad Korea.

korn-skar g., korn etre daou dra skaret.

kornventer g., benveg e stumm hantergalec'h, dereziet, evit muzuliañ ar c'hornioù.

korraresker g., benveg gweledonizh a ro an tu da welout traoù re vihan evit bezañ gwalet war-eeun; ar skeudenn gwalet dre skonzell ar c'horra-gresker a zo etre 50 ha 100 000 gwezh brasoc'h eget an dra.

korventad g., pezh a vez dibradet ha kaset gant ur gorventañ; sk.: korventad uloc'h.

korvo g. (Brh.: corvo, Brk.: coruco, coruoadur, coruoder), gonid, mad tennet eus ul labour, un embregerezh, h.a.

korvoad g., den ma vez tennet gonid eus e labour gant un all.

korvoadur g., sl.: korvo; ar c'horvoañ.

korvoadus ag., a c'heller tennañ gonid dicutañ.

korvoeg, korvoer g., den o tennañ gonid eus ul labour, un embregerezh.

korvoerezh g., goniderezh, travekaerezh.

korvoidigezh gg., gonidigezh.

korvoñ v., tennañ gonid eus.

korvoñs ag., a ro tro d'ar gonid.

korzenn-arnodif gg., lestrig gwer e stumm kranenn boaziet en arnodvaoù.

koskor ad., db. ur stêr, an adstêrioù anezhi.

koskoradur g., an dud implijet en un ijinerezh, h.a.

koskorvaez g., tachennad vro dalc'het gant ur stêr hag hec'h adstêrioù.

kotoñvad g., gwiañ kotoñs.

kotoñsenn gg., -ad, brousgwezenn-gotoñs.

kotoñsenn gg., tachennad vro dindan c'honidigezh ar c'hotoñs.

koueriadel ag., db. ar goueriaded; db. ur boblañs, a zo ar gouerinded trec'h enni.

kouc'henn gg. (kv. Br.: kouc'h, Km.: cwch), kement saurt bag vihan.

kouevren gg., gwalead kailh kouevr.

kraoñ l., gwriziannoù lann ha balan.

krai ag. (Brk.: crai; kv. Km.: defnyddiau crai), db. danvezioù diaoz, evel ar c'hailh, h.a.

kraienn gg., danvezenn grai.

kravez gg. (Km.: crefydd), relijion.

kravezprederouriezhel ag., o tennañ d'ar relijion ha d'ar braderouriezh war un dro.

Kred Pipuezal g., aozadur evit prestañ arc'hant da blouaziz.

kreistegalc'h g., kalc'h o tremen dre zaou benn-ahel an Douar.

kreiz-kerc'hell g., db. ur c'horf, poant-krog ar pangonnerzh diwar nezhoù ar ponnerder o weredif warnañ.

kreizkevandir ag., sl.: kreiztirel.

kreizenn dredan gg., greanti-kenderc'hañ tredan; hv.: tredanva.

kreizparzh g., lodenn lec'hiet e kreiz.

kreiztirel ag., db. mordearezh, h.a., graet war ar stêrioù, al lennoù, h.a.

krennberzh ag., a dalvoudegezh etre.

krennwienn ag., dezhañ gwiannoù krenn.

Krencour g. (Km.: Crynour), ezel ar rannredenn anvet e saozneg Quakers, diazezet er 17<sup>vet</sup> kantved gant George Fox ha ledet abaoe dre Vreizh-Veur hag Amerika.

krañvder g., braster un anadenn fizikal; unan eus peder elfenn arqueuzidik un nerzh, anavezet dre an nerzhventer.

kraol ag., db. ar greñled; g., den a hil gwenn bet ganet en ur vro du.

kreskvezh g., db. ar plant, padelozh ar c'hreskiñ.

krinennek ag., sec'h ha meinek.

kroazouenn ag., ganet diwar deareadoù disheñval, da sk. deñved-kig ha -gloan diwar deñved-kig parat gant deñved-gloan.

kroazva g., lec'h ma kroaz linannoù kehenterezh.

kroq-pouez dre loc'henn g., benveg-pouezañ o c'hoarvezout eus ul loc'henn

a istribilher, ar pouezioù o vezañ skourret diouzh un tu d'ar poent-istribilhañ, ur pouez stalonet o riklañ diouzh an tu all a-hed ur c'harenn dereziet.

krog-pouez dre winterell g., benveg-pouezañ a ya d'en ober ur c'harenn dereziet o voustrañ ur winterell e-barzh ur gerzenn.

kroc'han g. (kv. Km.: crochan), lestr e pri-poazh.

kroc'hanel ag., pri-poazhel (feilhañs, porselen,...)

krommenn gg., linenn o teluniañ un anadenn, da sk. astennidigezh ur winterell dre bouezioù staget outi; (Jed) lec'h ar poentoù a zo o dave-annoù diouzh ur gevreizhenn.

kroug gg., savadell ernodva evit lakaat traoù a-istribilh.

0

dafarez, unan a zafar, pourchaser.

dalc'had g., ec'honad diabarzh ul lestr, h.a.

dalc'her g., neb en deus ur vro en e veli, da sk. : goude bezañ hec'h aloubet.

dalc'hter g., ec'honder diabarzh ul lestr, h.a.

damanj gg., riez, sellet evel galloud armerzhel er bed.

damaozañ v., ober lod eus oberidigezhioù danzen un danvez.

dambar ag., hogos par; arcuez implijet da verkañ e van etre div werzhad un diforc'h na c'heller ket koazhañ; sk.:  $\frac{1}{3} \approx 0,33$ .

damdrevadennel ag., hogos trevadennel; hefevel ouzh ar stad trevadennel dre veur a zoare; sk.: stad damdrevadennel Sina a 1900.

damliv ag., hiron gant nebeut a zoareannoù gwengroc'henek.

dammenn ag., hiron hogos gwengroc'henek.

danzigevannez ag., hogos didud, hogos gouelec'hiek.

dangoad g., pezh a zo dindan vez ur c'hoad.

danvezadur g., an danveziañ; implij tennet aus; sk.: danvezadurioù nevez

ar c'haoutchoug.

danvezet g., unan a ra danvez gant, a implij; sk.: daveif an tradan d'an danvezetion.

danvezerezh g., obererezh danveziañ; sk.: danvezerezh ar glaou an ijinerezh an houarn.

danvezif v., ober danvez gant, implijout, lakaat da dalvezout; danvez-leskiñ eo an tereoul; kent bezañ danvezet avat e rank bezañ purast.

danzead g., tra danzeet.

danzeadur g., an danzen; disoc'h an danzen.

danzeerezh g., obererezh danzen.

danzen v. danzeet, ober war-dro dafar diaoz pe damaozet e-sell da dennañ implij diouto; sk.: danzen kailh houarn.

daouad g., div elfenn o vont e-gevret a mod pe vad; sk.: pep poent eus ur grommenn blen a vez anavezet dre un daouad daveannoù.

daouarnoù-labour l., tud gouest da labourat, sl.: tud-labour

daouvetalek ag., a zo daou vetal ennañ.

darempredaouet agv., darempredet meur a wazh pe gant meur a hini.

darnemm g., enebadur, diforc'h e-grenn etre daou dra nes pe denaset dre an devezout.

dargemmañ v., diskouez dargemm, lakaat dargemm e.

dargemmek ag., a zo dargemm ennañ pe strezo.

darnacouadur g., an darnacouañ; diframmadur a lodennoù bihan.

darndreavadenniñ v., trevadenniñ lodennoù eus (ur vro).

darnodiñ v., ober taolioù-esea, war ur savadell da sk., a-benn kavout doareoù he c'hempouez, h.a.

darsevel v., sevel a-daol.

darventezioù ls. (evit darvezantezioù), pezh a zo en-dro d'an ober, em-gelc'hiadoù, da sk. ar mare, al lec'h, h.a.

darvezadur g., darvoudoù ur pezh-c'hoari.

daskêriad gg., strollad kêrioù amezek deuet da gendeuziñ dre forzh en em ledañ; hv.: dastolpad, destolpad-kêrioù.

daspazh g., stad ingaladur; sk.: dasparzh ur boblañs en ur vro.

daspazhadur g., an dasparzhañ; disoc'h an dasparzhañ; sk.: dasparzhadur

daspazhadur

dizingal-kenan ar boblañs.

daspazhafi v., lodennañ, pe diouzh lodennoù hiniennel pe diouzh un ingal-  
adur diderr.

dassonnenn gg., heklev, dasonn dibar; sk.: e barzhonegoù 'zo e klever un  
dassonnenn eus kredennoù ar Sketla.

dastolpad g., strollad (kêrioù da sk.) deuet da gendeuziñ dre forzh en em  
ledañ; sl.: daskêriad.

dastolpadur g., dastolpidigezh gg., an dastolpañ.

dastolpañ v., db. kêrioù, dont da gendeuziñ dre forzh en em ledañ.

dastumborzh g., porzh ma vez staliet marc'hadourezh, h.a.

dastumenn gg., klozadur un destenn oc'h adreñf e berr ar pennañ danvez anezhi.

daveadur g. (kv. Br.: daveañ), kañver dibar etre daou dra, div anadenn, daou  
geal, h.a.

daveel ag., db. ur c'hementad, dewerzhed kevreizh d'un all; sk.: mar lakaer  
1 evel gwerzhad douester an dour, e vo 0,9 douester daveel an eoul.

daveenn gg., elfenn ventoniel o talvezout da spisañ ur poent e-keñver ur  
poent all, un avel, h.a. Da spisañ ur poent diouzh tri roud an ec'hon-  
der e reer gant an teir daveenn anvet ledenn, hedenn, savenn.

davit gl. o verkañ kerzhidigezh war-du ur stad dibar; sk.: mont a ra ar  
vental davit kempouez.

dazetrest agv., lakaet etre reoù all; sk.: gonidigezhioù dazetrest o teurel  
betek pemp eostad bep bloaz.

dazloc'h g., an dazloc'haf; disoc'h an dazloc'haf.

dazloc'haf v., loc'haf dre flistraf war drefiv aezhenn war dizh bras.

dazloc'hell gg., ijinann o tazloc'haf; sl.: fuc'hell.

dedalvezañ v., lakaat da dalvezout.

dedalvezadur g., an dedalvezañ; disoc'h an dedalvezañ.

dedaclus ag., o teurel frouezh; hv.: kenderc'hus.

dedannerezh g., obererezh dedennañ; sk.: dedannerezh an Douar a ro da veiz-  
out pouez an traoù.

dedeuziñ v., db. un elfenn-boblañs, en em veskañ en un elfenn all.

dehouel ag. (Km.: deheuol, Br.: dehou = su), kraistazel, -su.

delanvad, delanv g. (kv. Km.: dylanwad), levezon un dra war un dra all.

delanvadif, delanvif v., levezonaf war, kaout lafa war, efedif war.

delec'hiañ v., spisañ al lec'h.

delifiv g. (Km.: dylif), danvezenn lakaet gant ar c'hailh evit aasaat  
teuzidigezh ar metal.

deltu g., jourdoul, nerzh-bevañ.

deluniadur g., an deluniañ; disoc'h an deluniañ.

deluniañ v. (kv. Km. Br.: lun), ardeuziañ dre lunioù an anadennoù, ar  
c'hementadoù, h.a.

delunius ag., o teluniañ; sk.: pep poent o talvezout da sevel krommenn-  
stalonañ ur winterell a reer anezhañ poent delunius ur vuzuliedenn.

derezata v., db. gonit-douar, terkaf un dachenn-douar war naoù dre hec'h  
azrannañ en un heuliad pazennadoù a-zremm.

dereziad g., an hed etre daou zerez en ur benveg-muzuliañ.

dereziadur g., an dereziañ; disoc'h an dereziañ; ar steudad derezioù merket  
war ur benveg-muzuliañ.

dereziañ v., merkañ derezioù war; azrannañ e derezioù.

derezienn gg., merk un derez war ur benveg-muzuliañ.

derc'han g., kevrañ-greiz un atomenn.

derc'hanel ag., db. an derc'hanoù, sk.: fizik derc'hanel.

derc'hlinenn gg., saunenn a-zerc'h.

desachaf v., sachaf war-du an unan, dedennañ.

destagañ v., db. ur riez, stagañ ouzh he ziriagezh (ur vro all, h.a.).

devec'hiañ v., lakaat ar hec'h da greskiñ; sk.: diouzh ar c'hailh aluminom,  
dre o devac'hiañ, e tennez an alumin.

devoudad g., nap anadenn e kement ha ma'z eo degaset d'ar boud; efed.

devoudaf v., degas d'ar boud; degas evel efed.

dewerzhaf v., termenañ gwerzhad ur c'hementad.

dezavout v., obererezh ar spered pa gouñ, pa veiz, pa varn, h.a.

dezougen v., dougen d'ul lec'h all.

dezougerezh g., obererezh dezougen; kevrañ aus an armerzh o sellout ouzh  
kaserezh ar veajourion hag ar marc'hadourezhioù.

dezrevell gg., kement lavarenn a c'hell bezañ lakaet, pe c'houlakaet, gwir  
pe faos.

dezrevellañ v., displegañ e stumm un dezrevell.

dezverkañ v., merkañ spis, arouezennañ.

diabarzh- rakger, en anvioù douaroniezh, a verk ar rannbarzhioù lec'hiet pell diouzh ar mor; sk.: Diabarzhamazonia.

diabarzhvro gg., rannbarzh ur vro lec'hiet pell diouzh ar mor.

diabarzhvroad g., annezad an diabarzhvro.

diantell ag., kollet gantañ e c'hred, e fiziads er vuhez, h.a.

diantellerezh g., stad unan diantell.

diarz ag., nann danzeet; er stad natur, krañ, evel ar c'hailh houarn; kent bezañ pleusket, evel an dir.

diastennus ag., na c'hell ket bezañ hiraet.

diavaez ag., a zo er-maez; (Prd) a zo e hanvoud dizalc'h diouzh a vout anavezet geneomp; db. traoù kenetrezo, a zo pep hini er-maez eus ar re all, evita da hanvezout en hevelep amzer.

diavaezded gg., doare ar pezh a zo diavaez.

diaz g., (Men) regenn pe c'horreenn ma venter ar sav a-serzh diouti.

diazad g., rannbarzh bro kalc'hiet gant uhelennoù.

diazenn gg., lec'h izeloc'h, izelenn.

dibar ag., (Jed) na deo ket par, arouez : ≠

dibengennañ v., diempriañ un nerzh e kednerzhoù; sl.: pengennañ.

dibengennidigezh gg., oberidigezh dibengennañ.

dibennañ (gant) v., kaout udb. evel dibenn.

dibourc'hidik ag., db. ar gwez, a goll o dalioù er goañv; hv.: dizelius.

dik ag., db. un dezrevell, a leka anavezout reizh ha diforc'hellek ar pezh a veneg; db. ur muzul mentoniezh, a zo par-rik d'ar vent muzuliet, sk.: kehad e vez dik skañ ar c'helc'h da du ar c'hwec'hkorn enkelc'hiet; db. ur muzul fizikel, reizh d'an derez resister dibabet, sk.: mar bez ur ventel evit muzuliañ 100 g war-nes 1 cg, e c'hell bezañ dik ar muzul 102,6 g, hogen ne c'hell ket bezañ dik ar muzul 102,625 g.

didemzoù ag. & rv., hep temzoù, hep ober gant an temzoù.

didemnañ v., merkañ ar bevannoù; spisaat.

didorr ag., hep troc'h, hep astal.

didorrenn gg., hollad didorr; sk.: an didorrenn ec'honder-amzer.

didrev ag., db. ur vro, h.a., n'eo ket bet lakaat da dalvezout ar barreg-ezhioù anezhi, n'eo ket bet trevekaat.

didrevadennañ v., lakaat paouez d'ar stad trevadennel.

didrevadennerezh g., obererezh didrevadennañ.

diegi gg., (Fiz) harz ar c'horfoù ouzh al loc'hañ.

diempriañ v., disrannañ un hollad e lodennoù.

diere ag., dizalc'h, distag, dieub; (Fiz) db. elektron, na vezont ket stag ouzh an atom, a c'hell loc'hañ dre an danvez.

diferañ v., merkañ da reolenn, divizout, sk.: difezañ un unanenn.

diflokad g., db. torosennadur, torr a-darroz.

diforc'h g., disoc'h al lamadur : an diforc'h atre an nivezoù A ha B eo an niver a zo e sammad gant B par da A.

diforc'hell ag., a c'hell bezañ marzhet pe meizet en un doare hepken, sk.: doareenn diforc'hell an evned eo ar pluñv.

diforc'hellek ag., ha n'eo ket forc'hellek; diforc'hell.

diforz ag., forzh pe hini.

difred ag., dilabour, dizimplij.

digas ag., db. ar c'hempouez, pa ne vez na stabil na distabil.

digehent ag., hep hentoù dazemprediañ ennañ, pe etrezo.

digelenn ag., n'en deus degemeret kelennadur ebet.

digelenned gg., doare unan digelenn.

digempazhek ag., n'emañ ket diouzh lezennoù ar gempazhezh.

digenaozad g., danvezenn diwar digenaozidigezh un all.

digenaozadur g., an digenaozañ; disoc'h an digenaozañ.

digenaozadus ag., a c'hell bezañ digenaozet.

digenaozañ v., db. un dra kemplezh, mont pe e lakaat da vont en e gevannoù, en e elfennoù.

digenroud ag., disheñvel o roud; disheñvel e roud diouz.

digerreizh ag., db. un hinad, n'eo ket kerreizh.

digevanañ v., lakaat ur c'horf da zigevanañ.

digevanidigezh gg., oberidigezh digevanañ, pa digevanañ.

digevaniñ v., db. ur c'horf fizikel, treiñ a korfoù nevez en ur leuskal gramm, dre skiriedigezh e zerc'hanoù, sl.: skinoberiegezh, skiriañ.

digevredif v., disrannañ pezh a oa unanet; en em zisrannañ diouzh ar re ma oad unanet ganto.

Digevredif (Brezel an) g., brezel-diabarzh ar Stadoù-Unanet (1861-65) etre Stadoù an Norz, enepsklaver, ha Stadoù sklaverion ar Su.

digorva g., lec'h-gwerzhañ, -ezporzhiañ evit marc'hadourzhioù, kenderc'hadoù ur vro, h.a.

digorvo ag., na vez ket tennet korvo dioutañ.

digreizañ v., o pelleat diouzh ar c'hreiz.

dihentadus ag., db. ul lec'h, na c'heller ket mont, beajiñ drezañ.

dihentus ag., db. ur vro, diaes kaout hentoù enni; db. un den, n'eo ket tuet da zarempredañ an dud all.

dichaladurel ag., db. al lec'hid lezet war o lorc'h gant ar mor, ar stêrioù, h.a.

dileatr ag., hep lastr; tennet dioutañ e lastr.

dilec'hiadur g., an dilec'hiañ; disoc'h an dilec'hiañ.

dilec'hiañ v., kemmañ lec'h.

dileizhadus ag., a c'heller dileizhañ, hv.: hezileizh, sk.: ar sukr hag an holen a vez dileizhadus.

dileizhañ v., lakaat da zileizhiñ, sk.: an dour a zileizh ar sukr.

dileizhenn gg., liñvenn diwar dileizhidigezh ur c'haled, un aezhenn pe ul liñvenn all en ul liñvenn.

dileizher g., denvez implijet da zileizhañ, sk.: un dileizher mat ouzh an drouzennoù eo an tetraklorometan.

dileizhidigezh gg., an dileizhiñ pe an dileizhañ.

dileizhiñ v., db. un danvezenn, mont e stumm euflennoù molekulel a-strew en ul liñvenn pe ur c'haled.

dilive g., kemmañ live etre div leurenn, gorraoù div liñvenn, h.a.

dinaoziañ v., db. ur stêr, mont dreist he glannoù; kemmañ naoz.

dinaoziadur g., an dinaoziañ; disoc'h an dinaoziañ.

dinaz gg., (L'Arm.: dinass, Km.: dinas), kêr, prl. bras ha kaer.

dinazenn gg., ti a lorc'h, ti-meur, palez.

dindan gorvo gl.g., db. barregezhioù, a lakaer da dalvezout, a denner

kenderc'h diouto.

dindan c'honit gl. av., labourer an douar ennañ; a'denner kenderc'h dioutañ.

dife g., (Men) kensturdaleg a zo karrezioù he c'hwec'h tal.

diorreadur g., an diorren; disoc'h an diorren.

diorreat agv., (Don) db. ur vro, h.a., deuet d'ur stad a urzhiadurezh kevredadel hag armerzhel e-kempouez diouzh ezhommoù ar mare; sl.: diorren.

diorren v. diorreat, (Fiz) lakaat (un nerzh, h.a.) da labourer (war), sk.: ouzh penn ul lec'henn e diorreat un nerzh 5 newton kreffter; (Don) dont d'ur stad a urzhiadurezh kevredadel hag armerzhel uheloc'h; "kreskiñ" a dalv evit ur gwelladur armerzhel rik, tra ma verk ar ger "diorren" kemmaer an emframmoù kevredadel hag armerzhel war un dro; da skouer : emañ ar Stadoù-Unanet war gresk, ha Sina war ziorren " (P. Pennek).

dirafañ v., db. an dour, rasklañ (douar, h.a.) dre grignerezh.

direizhvare ag., a vareoù direoliek.

direoliek ag., e-maez reol e-keñver amzer, ec'honder, stumm, h.a.

direoliekter g., doare un dra direoliek.

diriad g., heuliad pazennadet; sk.: un diriad fardelloù war ur stêr.

dirim ag., hep rimiañ.

dis rv., kanan, tre; sk.: kemerit an hent-se, eeun-dis; un tamm douar plaen-dis.

diskluz ag., hep skluz warnañ.

diskorn ag., hep skorn.

diseimañ v., tennañ ar seim, ar gev; sk.: diseimañ ar gwez-hevea.

diseurtiezh gg., lieselfenniezh, disheñvaliezh; sk.: diseurtiezh ar pobladur ne vras ket ouzh unvanidigezh ar vro.

dislonkadurel ag., db. an danvezioù taolet gant ar menezioù-tan, pe an taurel anezho.

dispis ag., n'eo ket marzhet fraezh pe maizet klok.

disred g., pezh a red kuit eus ul liñvenn, h.a.; war zisred, db. ul lennad dour da sk., a vez o redek kuit dizehan ul lodenn anezhi.

disterberzh ag., a zo distar e barzhioù, sk.: marc'hadourezh disterberzh.

distokañ v., pelleat pezh a oa stok, diharpañ.

distrolladus ag., a c'hall bezañ distrollet.

distrollañ v., distagañ an elfennoù a ya d'ober udb.

distummadus ag., a c'hall bezañ distummet.

divarr g., naou bihan kenan; war zisvarr, db. un dachenn douar, bihan kenan an naou anezhi.

diuzouennañ v. (kv. Br.: diuz, gouenn), db. loaned ha plant; dibabet ha gwellaet ar ouann anezho.

divezziaded gg., dilezadedeg-vaezioù.

divetal g., rumad korfoù eun n'o devez ket perzhioù ar metaloù, sk.: an oksigen, ar fosfor; hv. kozh : metaloidenn.

divigad g., kement a vank d'an enkef da gempouezañ an ezkef.

divigadek ag., o c'houzañv divigad.

divigadel ag., db. divigad.

divigañ v., db. ur vengleuz, h.a., mont da get an danvez-korvo anezhi.

divioc'henn gg., savadell o c'hoarvezout eus div loc'henn kenvellet dre c' mentoù-harp; sk.: an durkez.

divvent ag., aroueziet gant daou seurt mentoù; sk.: un egorenn divvent eo ur biaeenn.

diwezhiñ v., db. ur stêr, daspugn an doursier diwar.

diwirabaq ag. & rv., nep un abeg gwirion.

dizalc'he'hif v., paouez bezañ dalc'het, dont e-maez a zalc'hidigezh.

dizarbenn v., (fiz) herzel euzh, trec'hif da; sk.: dizarbenn neizhoù.

dizibourc'h ag., db. ar gwaz, na gollont ket o delioù er goañv.

dizilc'zh ag., na c'hall ket dilc'hif.

dizunouenn ag., a ouannoù diseurt.

dleadeg ag., ennañ karantez ouzh e zlead.

doanecouriezh gg., kelennadurezh o lakaat "an droug dreist ar mad a-fet p'irvidikaat ar vuhez-diaberzh hag ar skiant da dannañ a-zivout penn-gudenn ar c'heñvez etre korf ha sperezh" (J. Teppe).

dolar g., moneiz amerikan ha kanadian.

doneadenn gg., gwezhiad dont; en ur monedone, kement tremen eus al lakadur pellañ d'al lakadur paouez.

donnozañ v., aozañ, oberiañ gant labour an douarn; star ledan : oberiata.

douargrenadenn gg., strofsadenn er bluskenn Douar.

dourhent g., hent evit ar c'hirri-tan.  
Notenn.- Bezañ a tiforc'her an tirhent (a c'hall bezañ dourhent pe houarnhent), an dourhent (a c'hall bezañ morhent pe stêr-hent), an erhent.

dourhental ag., db. an dourhent.

douarventour g., unan a oar diouzh douarventouriezh.

douarventouriel ag., db. douarventouriezh.

douarventouriezh gg., studi ar muzulioù (pallderioù, gorreadoù) kemeret war gorre an Douar.

doues ag., start an danvez anezhañ.

douster g., doare un dra doues; (fiz) db. kaledoù ha lifvennoù, keñver etre tolzder ac'honel ur c'horf ha tolzder ac'honel an dour da 4°C gwrezverk; db. aezhennoù, keñver etre tolzder ac'honel un aezhenn ha tolzder ac'honel an aer kemeret d'an hevelep gwrezverk ha gwask.

dourdredan g., tredan oberiet diwar gremm an dour.

dourdredanel ag., db. dourdredan; sk.: diorreet dispar eo aveadur dour-dredanel Kanada.

dourdredanva g., kreizenn oberiañ tredan diwar gremm an dour; berrnet e : dourva.

dourhent g., hent evit ar bigi, pe stêr, pe vor.

dourhental ag., db. an dourhent.

dourrannadur g., an dourrannañ; disoc'h an dourrannañ.

dourrannadus ag., a c'hall bezañ dourrannet.

dourrannañ v., digenaazañ ur c'horf dre an dour, hemañ o vezañ digenaozet ivez, AB + HOH → AH + BOH, sk. dourrannañ a reer an druzennoù pa reer soavoc.

dourrencur g., unan a oar diouzh dourrencuriezh.

dourrencuriezh gg., ijinouriezh kas an dour.

dourva g. sl.: dourdredanva.

dreganted g., kemented dre gant, feur war gant.

dreistbec'h g., db. muzulioù, pezh a zo lakaet ouzhpenn ur pouez, un tolz.

dreistkenderc'h g., kenderc'h en tu all d'an ezhommoù, d'ar warzh.

dreistlañs g., trec'h, levezon, pouez-dreist; sk.: Riezoù Europa gozh o

welout an dreistlañs o tifiplañ diouto.

dreistpennahel ag., o tremen dreist penn-ahel an Douar.

dreistriazel ag., astennet e vann war veur a riez, sk.: savet ez eus bet Aozadurioù Riezel ha Dreistriazel a zo o c'hefridi reolif ha reizh-ekaat nevid-bed an edeier.

dreistuhelaat v., mont pe kas uheloc'h c'hoazh.

dremmlive g., livé e-zremm.

dremmour g., c'hoarier c'hoariva, h.a.

droukziraev v., degas efedoù fall e.

druzenn gg., danvezenn druz.

durc'haat v., treiñ (war-du).

durc'hadur g., an durc'haat; disoc'h an durc'haat; doare m'emañ traet ur c'horf, ul loc'hañ, h.a.

E

e-kefin gl., nes, e-kichen, el lec'hioù war-dro; sk.: ar c'hêrioù savet e-kefin ar penn-ahel.

e-kehent gant gl., db. ul lestr, kacut digor en (unan all); db. broezioù, bezañ e darempred gant.

e-kempouez rv., er stad kempouez.

e-kefver gl., e-dal da; o sellout ouzh; diouz, diouz feur; sk.: felander ha reizhder mental Roberval a zo e-kefver pouezañ 5 kg war-nes un nebaut dekigrammoù.

edynn gg., tachennad vro dindan c'honidigezh an ed.

eeunenn gg., linenn eeun; (Men) regenn eeun.

eeunennek ag., a zo diouz ur regenn eeun; dezhañ doare un eeunenn; sk.: ar striedell a zo deluniadur nep gwered eeunennek.

eeunredek evel eeunredek.

eeunregenn gg., regenn eeun.

eeunredek, eeunredek ag., a zo diouz ur regenn eeun, sk.: dilec'hiadur eeunredek.

egor g., metoù a verzomp evel lec'hlezh; nep doare lec'hlezh anadennel, jedoniezhal, h.a.

Notenn 1. Keal anadennel an egor a emleg tri doare-bezañ : an doare regek, pe regder, aroueziet gant ar reg treset gant an alar (sl.: regad, h.a.); an doare gorrek, pe gorreder, aroueziet gant gorre an doureier (sl.: gorread, h.a.); an doare ec'honok, pe ec'honder, aroueziet gant ec'honidigezh ar gouloù (sl.: ec'honad, h.a.).

Notenn 2. Diouz keal anadennel an egor e tenner meizad mentoniel an egor, metoù didorr, diharz, mentaouek, h.a.; da heul e vez meizet evel lec'hlezh ventoniel ar regder, ar gorreder, an ec'honder, ha lakeat warno d'o zermenañ pep a reizhiad mentoù :

lec'hlezh	mentenn	mentad			mentoù
		anv	reollun	unanenn	
regder	regenn	regad	L	m	hed,
gorreder	gorreenn	gorread	L <sup>2</sup>	m <sup>2</sup>	hed, led
ec'honder	ec'honenn	ec'honad	L <sup>3</sup>	m <sup>3</sup>	hed, led, sav

egorad g., kementad un egorenn, ataladoù mentawouriezhal L<sup>V</sup>, sk.: regad, gorread, ec'honad a zo an tri egorad.

egorant ag., bras kenan e vent.

egorder g., (Fiz) anv-rumm ar mentadoù, hag ar mentennoù keffersk, doveret dre rannadur eus an egoradoù, sk.: an tizh, pe regder amzerel, L<sup>T-1</sup>, ar gorreder amzerel, L<sup>2T-1</sup>, hag an ec'hongas, pe ec'honder amzerel, L<sup>3T-1</sup>, a zo an tri egorder amzerel.

egorel ag., db. an egor; (Fiz) stumm doareañ mentawouriezhal o venegif : rannet dre un egorad, sk.: an tolzder regel, ML<sup>-1</sup>, an tolzder gorreel, ML<sup>-2</sup>, an tolzder ec'honel, ML<sup>-3</sup>, a zo an tri zolzder egorel.

egorenn gg., anv-rumm mentennoù fizikel, hiniennoù egor, dezhañ un, div, teir ment, sk.: regenn, gorreenn, ec'honenn a zo an teir egorenn.

egorenek ag., dezhañ doare an egorennoù, sk.: deluniadur egorenek ur ventenn.

egorennel ag., dezhañ perzhioù an egorenn.

egorennlezh gg., perzh egorenn, sk.: ul linenn, ul leurenn, un dorreenn a vez termenet dre o egorennlezh.

ehanborzh g., porzh-mor pe -aer ma ehan listri ul linenn.

ec'haozad g., danvezenn diwar ec'haozidigezh un all.

ec'haozaf v. (kv. Br.: ec'h-, aozaf), db. un danvezenn gimiek, distraif d'hec'h elfennoù; ko.: enaozaf.

ec'haozidigezh gg., db. un danvezenn, distro d'hec'h elfennoù.

ec'honad g., kementad un ec'honenn, mentad termenet evel liesad ur gorread dre ur regad, atalad mentawouriezhel :  $V = L^3$ .

ec'honder g., (Prd) doare-bezañ ec'honek; (Jed) lec'helezh ec'honek, egor taiment; (Fiz) anv-rumm ar mentadoù, hag ar mentennoù keñverek, doareet dre rannadur eus an ec'honad, ataladoù mentawouriezhel :  $L^3 \times V$ , sk.: an ec'hongas, pe ec'honder amzerel,  $L^3 T^{-1}$ .

ec'honek ag., db. un doare-bezañ en egor, savelet da sk. gant ec'honidigezh al luc'h.

ec'honel ag., stumm doareaf mentawouriezhel o venegif : rennet dre un ec'honad, ataladoù mentawouriezhel :  $XL^{-3}$ , sk.:  $ML^{-3}$ , tolzder ec'honel.

ec'honenn gg., mentenn fizikel, hinienn ec'honder, dezhi da ventoù an hed, al led, ar sav.

ec'honennek ag., dezhañ doare an ec'honennoù, sk.: skiantourion 'zo a ra gant luniadur ec'honennek ar spered.

ec'honennel ag., dezhañ perzhioù an ec'honenn.

ec'honennelezh gg., perzh ec'honenn, sk.: un dorosenn a zo un elfenn na deu e penn-kont nemet an ec'honennelezh anezhi.

ec'hongas g., mentenn fizikel, fonnder ur berañ dewezhet dre an ec'honadoù; mentad fizikel, termenet evel rannad an ec'honad dre an amzer, ec'honder amzerel, atalad mentawouriezhel :  $L^3 T^{-1}$ .

echonidigezh gg., an ec'honid, sk.: ec'honidigezh al luc'h.

ec'honid v., en em astenn a bep tu.

eiladenn gg., skeudenn un dra a vent hag a stumm ganti, sk.: eiladenn un delwenn, un daolenn livet.

eiladur g., an ober eiladennoù; disoc'h an ober eiladennoù.

eiladurif v., ober eiladennoù, eilskeudenniñ.

eilenn gg., unanenn amzer, kemeret da unanenn-diezez gant ar reizhiad MKSA, s.

eiler g., skoszeiler.

elektron as. -enn, rannigoù elfennel an danvez; diere, e reont an tredan.

elektronik ag., db. elektron pe elektronik.

elektronik g., studi ar rehennoù luskelladek.

eleze gl., da lavarout eo.

elfennel ag., db. elfennoù; sellet evel kevrenn vihanañ un dra; sk.: an elektron e zo e-touezh rannigoù elfennel an danvez.

elfennerezh g., obererezh elfennel; hv.: dielfennerezh.

elfennif v., savelañ elfennoù udb.

elvad as.u.: elvenn, palioùigoù frammet a-skin ouzh trogelc'h ur rod, pe da zegemer bunt an dour (milin-dour), pe da vuntañ war an dour (lestr war rodoù).

emdourad g., kejidigezh div froud, h.a., enebek; sk.: diwar emdourad Froudveur al Labrador hag ar Froudveur Amerikat e teu mor rust, letar, skornegrec'hioù kentrer ha pesked a-leizh.

emfram g., (Prd) neuz e koulz ha m'en em fram en hor gweladur evel undad dirannus; kevred naturel war steg ha war gempouez, sk.: ar glogerenn soavon, an daou laz mell-droad war an dachenn, h.a.

emgrefek ag. (Br.: em-, kef-, re(n)), db. un ijinenn, a zo evit sevenañ drezi hec'h-unan ul labour, ur gefridi, un obererezh kemplezh, lies-prantadek.

emgreek g., db. ur boblañs, diforc'h etre niver ar ganedigezhioù ha niver ar marvoù, o lezel e-maez kont an enbroadur.

emgurzhad g., stumm berraet dre fatadur elfennoù 'zo; "kornôg" zo un em-gurzhad diwar "kornaoueg".

emplegaf v., (Prd) un maizad a empleg un all, pe vez hemañ endalc'het ennañ e-galloud, pe pa vez tennet dre ret dioutañ; sk.: bezañ bronneg a empleg bezañ mellkeineg.

emsaevus ag., gonidus, ec'h ober gwell (da).

emsilus ag., o reif da c'houzout dre gaer.

enaozad g., tra enaozet; disoc'h an enaozaf.

enaozaf v., danzen, naturel pe kalvezadel, un danvezenn diwar hec'h elfennoù; ko.: ec'haozaf.

enaozidigezh gg., an enaozaf.

enkadenn-amzerh gg., prantad amjastr, ma vez diaes da zerc'hel e kempouez buhez arboellerezhel ur vro, h.a.

enkef g., an arc'hant degemeret e-doug ur prantad lavaret, pe da gefvez un afer; an degemerout arc'hant.

enkefiadur g., an degemerout arc'hant; disoc'h an degemerout arc'hant.

enkefiat v. degemerout arc'hant; ko.: ezkefiat.

en-dizolo rv., db. menglausiñ, pa emañ a-rez douar ar gweleadoù korvoet.

enebek ag., an eil a-dal hag a-c'hin d'agile.

enqlenaf v., pegañ, spegañ, darc'hel spag e.

enqlenus ag., o tarc'hel spag e, sk.: golorodoù englenus.

enporzhiad g., pezh a vez enporzhiet.

enporzhiadur g., an enporzhiañ; disoc'h an enporzhiañ.

enporzhiañ v., degas (marc'hadourzhioù) a vaez-bro; ko.: ezporzhiañ.

enporzhierzh g., obererzh enporzhiañ.

enraaq g., gwellaadur, klokadur sellet evel ur mont war-raok.

enteuziñ v., db. ur genel, stagañ outi, meskañ ganti tud arallgenel, ouzh o lakeat da goll ar pezh o diforc'h diouti.

erlec'h g., lec'h eoriañ.

eouldi g., labouradeg oberiañ eoul-debrif.

eoulqimiezh gg., kimiezh an tirsoul.

eoullenn sl.: tireoullenn

ecullestr g., lestr da zezougen tireoul.

ecullestraz gg., strollad eoullistri ur vro, h.a.

eoulsen gg., korzenn da gas an tirsoul a-dreuz un dachennad vro.

eouluzenn gg. eouluzed, plantenn, greunenn a vez tennet eoul diouti.

eoulvaez g., tared ma vez tirsoul en e gondon.

erlec'hiañ (A ouzh B)v., lakeat A e-lec'h B.

erlusk g., kas war-raok.

esorc'h g., dic'hlennidigezh ur stêr diwar gresk-dour.

eter g., (Kim) oksidenn etil (C<sub>2</sub>H<sub>5</sub>)<sub>2</sub>O, implijet er vezekniezh hag evel di-leizher.

etrelakaat v., kempenn un dra etre daou all.

etrerannvroel ag., etre div pe lias rannvro.

etretrovanel ag., lec'hiet etre an div Drovan.

eurierzh g., ijinerezh an eurieroù.

ezkef g., an arc'hant aet er-maez e-doug ur prantad lavaret, pe da gefver un afañ; an ezkefiañ.

ezkefiadur g., an ezkefiañ; disoc'h an ezkefiañ.

ezkefiañ v., lakeat arc'hant er-maez (dispignoù, presteù, daskoradurioù, h.a.); ko.: enkefiañ.

ez hollek rv., o vont dre vras; implijet goude studi un dro dibar evit reiñ da c'houzout emeur o vont da blediañ dre vras gant an trioù heñvel.

ezporzhiad g., pezh a vez ezporzhiet.

ezporzhiadur g., an ezporzhiañ; disoc'h an ezporzhiañ.

ezporzhiañ v., kas (marc'hadourzhioù) da vaez-bro; ko.: enporzhiañ.

ezporzhierzh g., obererzh ezporzhiañ.

eztennañ v., tennañ (kailh da sk.) er-maez (eus an douar da sk.)

eztannerezh g., obererzh eztennañ.

eztannlec'h g., lec'h ar bed, bro ma eztenner (glacou, h.a.); sk.: kentañ eztennlec'h ar glacou e voe Breizh-Veur.

eztanna g., lec'h resis, tared ma eztenner (glacou, h.a.); sk.: e Pennsilvania an Norz emañ koshañ eztenna glacou Amerika.

eztaoler v. eztaolet, diskouez mennoziñ, trivliadoù gant an dremm, ar vaezh, h.a.

ezvuzul ag., re vihan, pe re vras, evit bezañ muzuliet.

F

fazenda gg. (Portugaleg), atant vras e Brazil.

felan ag., db. ur benveg-muzuliañ, o reiñ bepred an hevelep muzul evit an hevelep kementad.

felander g., perzh ur benveg felan.

feuraou v., hemolc'hif al loened-feur.

feur-kreskiñ g., keñver etre kresk bloaziek ar boblañs hag an niver anezhi.

feur-emgresk g., keñver etre emgresk ar boblañs hag an niver anezhi, sl.: emgresk.

feur-geuel g., keñver etre niver bloaziek ar ganedigezhioù ha niver ar boblañs.

feur-mervel g., keñver etre niver bloaziek ar marvoù ha niver ar boblañs.

feurvil g., loen hemalc'het evit e feur.

fibrenn gg., danvez kimiek diwar ar c'helulez, implijet evit ober gwiadoù kalvezadél.

fifvaniezh gg., kevrenn eus al loc'honiezh, studi doareoù al loc'hañ ennañ e-unan.

fizik g., studi perzhioù ar c'horfoù hag ar c'hemmaù a c'hoarvez ganto hep kemnañ o natur.

fizikour g., unan a oar diouzh fizik.

forc'had g., diforc'h etre div werzhad kavet d'ur c'hementad dre hentoù disheñvel, unan o vezañ kemeret da werzhad dik; da sk. an diforc'h etre astenn ur winterell hag an astenn arlekadél jedet diwar ar grommenn-stalonadur anezhi.

forc'had gwrezverk g., diforc'h etre an uhelañ hag an izelañ gwrezverkoù muzuliet en ul lec'h e-doug un devezh, ur bloavezh, h.a.

forc'hellek ag., a c'hell bezañ merzhet pe meizet e meur a zoare disheñvel, da sk. un talm buanaet a vo fromadenn evit al lennegour, ha buandalm evit ar mezog.

forc'hellegezh gg., doare un dra forc'hellek.

forc'hellenn gg., elfenn, lavarenn forc'hellek.

fosfor g., (P; elfenn nn. 15; tolz atomek = 30,98; teuzverk = 44%) divetel a gaver en natur dindan stumm ar fosfatoù; en ijinerezh en tenner eus ar fosfat tric'halkék; ar sulfidenn fosfor a ya d'ober danvez tanus ar sklos.

founilhek ag., e stumm ur founilh, eleze strizh diouzh un tu, ledan diouzh an tu all.

foursellañ v., db. an dour-glev, kleuziañ rielennoù war gorre an douar.

frankvezezezh g., dizalc'htad ar c'henstriv etre an embregerezhioù-kenn-derc'hañ; sl.: frankizouriezh.

frankizour g., dalc'hiad ar frankizouriezh.

frankizouriezh gg., kalennadurezh stazammerzhel o strishaat emell ar Stad en urzhierzh ar c'hendere'h, o tifenn perc'hentiezh pravez an embregerezhioù, ar frankvezezezh, h.a.

frouzheg gg., lec'h dindan gwez-frouzheg.

fuc'hell gg., loc'hell arlusket dre zazloc'h.

G

galloudezh gg. mentenn fizikel, barrekter da zannvaziñ gremm budn pe vuanoc'h; mentad fizikel termenet evel rannad al labour dre an amzer, labourder amzerel : ur c'heflusker o kas da benn ul labour W en ur ober t silenn, a zo e c'halloudezh :

$$P = \frac{W}{t}; \text{ atalad mentawouriozhel : } P = M \cdot T^{-3}.$$

ganer g., ardivink o tanzen un elfenn ret d'un embregadur bennak; sk.: ur ganer tredan, ur ganer aketilen.

garveñ g. -añ, -ion, tra bev na c'heller ket gwelout hep skoazell ur c'horre-greker.

geneliezh gg., (Men) poent lakaet evel derou an daveennoù, h.a.

gennad g., rannad eus armerzh ur vro treset diouzh natur ar c'hendere'h, ar c'heflverioù gant ar Stad, h.a.; sk.: unan eus pennañ gennadoù armerzh Breizh eo ar gonit-douar; ar frankizouriezh a venn astenn d'ar muiañ ar gennad pravez.

geriaoueg gg., strollad ar gerioù o tennañ d'un danvez; roll ar gerioù implijet en un oberenñ, ur gevrenn-ouiziegezh, h.a.

gavel-skei gg., doare turkez troc'hus ha beg.

gindacquad g., reizhiad daou nerzh kenstur, par ha gindu; ar gindacquad a laka ar c'horf ma vez krog ennañ da c'hweldreif.

gindu ag., kenstur o roudoù, kontrol o zuioù.

glaou-gouleskiñ as., glaou da ober goulesk.

glaoueg gg., tachad kondan ma vez glaou.

glaouerezh g., ijinerezh ar glaou.

glasvod g., tachad glasvezuz e-kreiz ur goulec'h, glasvezeg.

glec'hiad g., diad bat dre skuilhañ dour prl. tomm war aozadoù plantel.

glenn g., an douar, sellet ouzh an doareoù naturel, an hin, an atil anezhañ.

qlikerin g., triol CH<sub>2</sub>OH-CHOH-CH<sub>2</sub>OH, ar pouezusañ eus liesalkooloù an

ijineriez; hv.: glikerol.  
glikin as., legumined gonezet evit o blounioù kaer arc'hlas pe limestra.  
gloanad g., gwiaad gloan.  
gloanerezh g., ijineriez ar gloan.  
gloaneri gg., lec'h ma vez danzaet ar gloan.  
glukid as., rankad danvezannoù bev-gimiek, o c'hoarvezout eus ar sukrennoù, ar polisakarid hag ar glukozid.  
godallad gg., kevienn gloz e kondan an douar a zo enni tireoul, tiraezhenn, h.a.  
golorod gg., gwalenn gleuz o danvez gwevn c'hwezat gant aez, frammet war rod ur c'harr.  
gonezadus ag., db. douar, a c'hell bezañ gonezet.  
gonit-sec'h g., doare gonit-douar war an douaroù sec'h.  
gonos ag., db. an douar pe an eostoù, treut, sinac'h, difrouezh.  
gorread g., kementad ur c'horreenn, mentad termenet evel liesad ur regad dre ur regad, atalad mentawouriezhel :  $S = L^2$ .  
gorreder g., (Prd) doare-bezañ gorreak; (Jed) lec'helezh c'horreak, egor divvent; (Fiz) anv-rumm ar mentadoù, hag ar mentennoù kefiyere, devarer dre rannadur eus ar gorread, ataladoù mentawouriezhel :  $L^2 \times V$ , sk.: gorreder amzerel,  $L^2 T^{-1}$ .  
gorreak ag., db. un doare-bezañ en egor, savelet da sk. gant kenvevenn an dour hag an aez.  
gorreel ag., stumm doareañ mentawouriezhel o venegif : rannet dre ur gorread, ataladoù mentawouriezhel :  $XL^{-2}$ , sk.: an tolder gorreel,  $ML^{-2}$ .  
gorreenn gg., mentenn fizikel, hinienn c'horreder, dezhi da ventoù an hed hag al led.  
gorreennek ag., dezhañ doare ar gorreannoù, sk.: luniadurioù gorreennek eus an c'honenoù e vez al luc'hskeudenoù.  
gorreennel ag., dezhañ perzhioù ar c'horreenn.  
gorreennlezh gg., perzh gorreenn, sk.: ul leurenn a zo un elfenn na deu o penn-kont nemet ar c'horreennlezh anezhi.  
goskor sl.: koskor.  
goudrovanel ag., db. un iskalc'henn Douar lec'hiet e-tro bevann ar galc'henn drovanel hag ar galc'henn gerreizh.  
gouezva g., lec'h m'emañ lezet an natur en he gouezari.

gouizielour g., unan tehet d'ar ouizielouriezh.  
gouizielouriezh gg., tech-d'ober eus ar ouiziegezh tachenn nemeti an anaoud-egezh, da gredif o vo diskoulmet ganti komant kudenn a sell ouzh tonke adur mab-den.  
goulog gg., kamb e strad ur vag.  
gouleskiñ v., strilhañ ar glaou en ur forn arbennik, anvet forn-gouleskiñ, da oberiañ ar goulosk.  
goulosk g., danvez kalot, karbon hogos pur, o c'hem o dilerc'h strilhidigezh ar glaou, implijet evel danvez-leskiñ en uhelfornioù.  
gourcoullestr g., coullestr bras-kenan, o tizhout kant mil tonenn.  
gourfauterek ag. (kv. Brk.: gourfauterecat), puilh-kenan, a-vestad.  
gourfennet agv. (gant), o kacut udb. an e zibann.  
gourferc'hennerezh g., doare parc'hennaf-douaroù o c'hoarvezout e domanioù bras e-kezh parc'henned prevez.  
gourhent g., hent bras evit ar c'hirri nemetken.  
Gournoz g., brozioù norzelañ Kanada, URSS, h.a.  
gourresia ag., db. benvegoù-muzuliañ savet a-ratozh evit ar muzulioù resis-kenan.  
gourresister g., perzh ur banveg gourresis.  
goursavheolel ag., db. pe da gefver ar goursav-heol; sk.: harzet e vez gonidigezh ar gwinizh er su gant glaveier goursavheolel an Drovann.  
gourzhenebad g. (Km.: gwrthwyneb-, Br.: ouzh, eneb), diforc'h etre daou dra, daou berzh enebet; hs.: dargemm, diston.  
govelierezh g., labour-danzen ar metaloù.  
govelius ag., db. ur metal, a c'haller laonennañ.  
goverez gg., greanti danzen ar metaloù, hv.: govel.  
gramm g., unanenn dolz, par d'ur vilvedenn gilogramm, g; sl.: kilogramm.  
gread gg., hollad tropelloù ur vro, h.a.  
greantel, greanterezh ag., db. greanterezh.  
greanteleat v. & g., reif un doare greantel da; diorren ar greanterezh.  
greanteladur g., ar greantelañ; sk.: greanteladur ar broioù amziorrest.  
greantelañ, greanterezhañ v., diorren ar greanterezh en ur vro, h.a.; sk.: greanteleañ riez Suamerika eo Argentina.

greanterezh g. (kv. Br.: greant), obererezh ijinerezhel.

Notenn.- Un diforc'h a zo etre ijinerezh ha greanterezh; ijinerezh a denn muioc'h d'an tu kalvezel : ijinerezh an houarn; greanterezh a denn muioc'h d'an tu amarzhel : greanterezh ar vro.

greanti g., labouradeg ijinerezhel.

greantour, evel greantour.

greantlec'h g., lec'h gouestlet d'ar greanterezh.

greantlestr g., bag pesketa ma vez warni ul labouradeg danzen ar pesked, ar bezhin, h.a.

greantour, greanter g., unan a ren un embregerezh ijinerezhel.

greantva g., diazezedur greanterezhel; taread dindan ijinerezhioù.

gremm g., mentad fizikel kevatal d'al labour : atalad mentawouriezhel :  $W = ML^2T^{-2}$ .

greunit g., karregad henhoalek kalet-kenan, hv.: greunvaen.

gromenn gg., sac'hig sidan kloz nezet warno c-unan gant larved ar balaf-enned; dre estenn-ster, lec'h ma vez miret en USA ar bigi nevez da c'hortoz mordeif.

gwalenn gg., lodenn bennañ ar ventel, anezhi ur varrenn vetal diblagus, kempazhek en-dro d'un actenn.

gwallhinat agv., db. ul lec'h, ma vez fall an temz-amzêr.

gwantenn gg., izelenn strizh.

gwareqad gg., steudad elfennoù e stumm ur wareg.

gwarell gg., korf o tesac'h ar bleud houarn; daou benn, anvet bleinod, a zo d'ur warell : ar blein norz, a denn da zorc'haat d'an norz, ar blein su, a denn da zorc'haat d'ar su.

gwarellek ag., db. ar gwarelloù pe ar warellegezh.

gwarellegezh gg., hollad pèrzhioù ar gwarelloù; hollad an anadennoù a-geñver gant ar gwarelloù.

gwarezva g., e Norzamerika, ranndiriad lezet e-kerz an Indianed, hervez ur statud a-ziforc'h.

gwaskell-adtaolennañ gg., ijinenn dre wask d'ober eiladurioù.

gwastaderezh g., alcuberezh ur vro didrev e-sell d'he zrovekaat, kenkizerezh.

gwatalat v., gwastañ, makaat; sk.: gwatalat eo bet an aost gant ar glaveier; "e-pad bloavezhioù an Dispac'h ne voe ket ken gwatalat Iliz Kastell hag hini Kemper" (Feiz ha Breiz 1927).

gwazad g., taol-labour en ur servij boutin; sk.: tri gwazad kirri-boutin a zo bemdez etre A ha B.

gwazva g., rann en ur meradur a zo fiziet enni un emall resis; sk.: gwazva ar genurzh.

gwennoblet agv., poblet gant gwengroc'hensioñ.

gweraerezh g., ijinerezh ar gwer.

gwered g. (Brk. guezret, Km. gweithred, Kn. gwythres), ober, labour, efed; sk.: gwered ar ponnerder war ar c'herfoù.

gwerediañ v., kaout efedoù, obererezh (war).

gweredus ag., o werediñ; sk.: an nerzh gweredus.

gwerinelaat v. & g., lakaat ar werin da gemer brasoc'h perzh e levierezh ar vro.

gweriniezh gg., stumm riez diazezet war ar werin; (Han) ar riezoù komuncur savet diwar skouez URSS : Gweriniezh Sina da sk.

gwerzhad gg., priziad kementadel; nep stad ma emañ ur c'hementad argemmel.

gwerzhlec'h g., lec'h ma kav ur vro, h.a., da werzhañ ha c'henderc'hadoù.

gwezennek ag., paot ar gwez ennañ.

gwezh sl.: gwech.

gwezhad, gwezhienn sl.: gwechad, gwechenn.

gwiadeg g. gwiadeier, kenderc'hadoù gwiaedel a bep saurt; sk.: ezporzhiadoù japan a c'hoarvez eus gwiadeier evit 35-40 %.

gwiadol ag., db. ar gwiaedoù pe ar gwiaerezh; sk.: an ijinerezh gwiaedel.

gwiaderez gg., labouradeg wiadiñ; sk.: emeur o sevel greantioù niverus e Norzina : nezaedegoù ha gwiaderezhioù kotoñs, h.a.

gwiaderezh g., obererezh gwiaediñ; ijinerezh gwiaediñ.

gwienn gg., neudennig a orin plantel, loanel, meinel pe gimiek a nezer d'ober gwiaedoù, h.a.

gwim as. & g., bugale an Emsav desavet e brazhoneg, sk.: ne chom enta nemet bugale ar vroadelourion, ar "gwim".

gwiriadur g., ar gwiriad; evezhiadur pizh; stadadur.

gwiriad v., lakaat gwir pe gwiriek; evezhiad pizh ouz ur stad a draoù da welout hag-ef emañ diouzh ar reol, reoliñ; kemer anaoudegezh eus ar pezh a zo e gwirionez, stadañ.

gwiriekadur g., evezhiadur a-benn gwelout ha gwir ez eo un dezrevell.

gwirienn gg., lavarenn anataus; he drezrevellañ a reer da gentañ, hag e tiskouezer a tisoc'h diouzh lavarenoù bet lakaet da wir diaraok.

gwrezad gg., kementad gwrez, atalad mentawouriezhel :  $Q = ML^2T^{-2}$ .

gwrezkaletaus ag., db. mezelloù 'zo, a galeta dindan wered ar wrez hag a chom kalet goude yenañ en-dro.

gwrez-tredan g., tredan oberiet diwar ar wrez.

gwrez-tredanel ag., db. gwrez-tredan.

gwrez-tredanva g., kreizenn oberiañ tredan diwar ar wrez; berraet e : gwrezva.

gwrezva g., sl. : gwrez-tredanva.

gwrezverk g., muzul derez keflusk an atom pe ar molekul, pe, eeunoc'h, derez tomder an traoù. Dishevel diouzh ar wrez a zo gremm an hevelap keflusk.

gwrezvezellaus ag., db. mezelloù 'zo, a vezella dindan wered ar wrez kelliës gwezh ma tommer anezho.

H

hanez g., istor; an istor evel danevellerezh c'hoarvoudoù.

hanezel ag., db. hanez; sk. : kelenn Istor hor bro, n'eo ket hepken an "istor-kontañ", an istor hanezel, hogen ivez an "istor-tonkañ".

hanezour g., unan a oar diouzh hanez.

hanren g. (kv. Br. Km. : han-, Br. : ren), doare mont dibar un anadenn, ur wikefrs; sk. : hanren ar glaveier, hanren ur c'heflusker.

hanter-zouar g., hanterann an Douar etre ar C'heheder hag ur Penn-ahel.

hanvezout v., kaout hanvoud, bezañ anezhañ, sk. : pezh a anver an traoù a hanvez dizalc'h diouzh o bout anavezet ganoomp.

hanvoud g., stad, doare bezañ, stuz; (Prd) han- a zo troc'h, dirann, diouer; an hanvoud enta, evel al latin existentia, a zo "dont er-maez eus; dont er-maez eus an Unan evit Plotin, er-maez eus ar bezus evit Leibniz, er-maez eus an netra evit Heidegger. An hanvoud a vije un doare distagadur, un torr, ur gloaz, ma'n em zisrann drezhañ un dra bennak diouzh an Unan, ar bezus pe an netra" (Y. Wahl).

gwirienn

hanvoudel ag., db. hanvoud.

harpadenn gg.; enebadenn, enep-lavar; sk. : te 'vez atav oc'h herpel, ne asantez morse d'ar pezh a lavar ar re all.

harz g., db. al loc'henn, ar c'horf ma wered warnañ ha dre-se a harz outi.

havregoù-beuz ls., doare gonidigezh dre lakaet ul lennad dour da c'holañ douar ar plantadurioù; sk. : ar riz, gonezet war havregoù-beuz, e ranna barzh an Housi-Ho.

heblander g., doare un dra hebled.

hebleusk ag., aes da bleuskaf.

hed g., ment an egor, kefverek ouzh ar roud anadennel a-saezh, ment nemeti ar ragder, kentañ ment ar gorreder hag an ec'honder, sl. : egor.

hedenn gg., unan eus an deveannoù kenserzh, douget war an ahel, lavaret a-saezh, Dy.

hed-gwagenn g., dilec'hiadur ur wagenn en ur ober un drovezh.

hed-hed rv. & gl., a-hed penn da benn, hed-ha-hed.

hedro ag., (fiz) o treiñ aes, pe aes da droñ.

hed-skar g., an hed ma sank ur vifis da bep tro; sl. : skar, silh, sazil.

heled g., forc'had brasañ gant ur c'hementad o luskellat en-dro d'ur werzhad-kempouez; sk. : heled luskelladennoù ur momeder.

heloc'h ag., aes da loc'haf; o loc'haf aes.

helosk ag., o leskiñ aes; implijet evel danvez-leskiñ.

helosk g., danvez-leskiñ.

hematit g., kailh houarn, a liv ruz pe c'hell, anezho peroksidenn houarn.

henarmerzhel ag., o tennañ da stummoù armerzh kozh, eleze kent mare ar gwaranterezh bras.

hendolzenad gg. (Don) menezieg stummet en oadvezhioù douarouriezhel koshañ.

hendorosennadur g., stummadurioù eus gorre an Douar o seval d'an oadvezhioù douarouriezhel koshañ.

hendrevadennel ag., db. un trevadennerezh a bell 'zo; db. mareoù koshañ an trevadennerezh.

henqenel gg., kenel diazezet en ur vro abaoe an amzerioù koshañ.

henqevanded gg., doare un dra klok warnañ a-unan abaoe an amzerioù koshañ.

henhoalad g., oadvezh douarouriezhel ar goshañ.

henhoalad

henhoalek ag., db. an henhoalad.

henhouarneg gg., tachadoù kondon ma vez houarn, hag int gwiskadoù douarouriezhel koshañ.

henn raganv-diskouezañ nepreizh, an dra-mañ, an dra-se; diforc'h diouzh en raganv gour trede, stumm gwan.

henseulad g., seulad stummet en oadvezhoù douarouriezhel koshañ.

hentad g., lec'h hentet, darempredet, ma veajer drezañ.

hentenn gg., hollad an doareoù-ober evit seveniñ un ober, tizhout ur pal, h.a.

hefvel ag., (Men) db. daou lun par o c'hornioù kefverek, a-genfaur o zuioù kefverek.

henvoazel ag., db. an doareoù-bevañ, ar c'hustumoù kozh.

henvroat ag., oc'h annezañ ar vro a bell 'zo.

herruz g., lodenn ur stêr ma'z a tizh bras gant an dour.

hertzel ag. (anv-den : Hertz), db. gwagennoù tredanwarellek brasoc'h o hed eget 0,03 mm.

heuliad g., strollad elfennoù lakaet lerc'h-ouzh-lerc'h, kv.: lerc'hriad; darvoud kaset d'e heul gant un darvoud all; kalz ledanoc'h eter heuliad eget hini devoudad, sk.: heuliad d'ar c'hleaved e vez alies an dinerzh, devoudad da astal ar galon e vez bepred ar marv.

hever ag., db. ar c'horfoù a vez link o molekul an eil re war ar re all, hag a gemer stumm al listri o dalc'h; sl.: aezhel, lifvel.

heverenn gg., danvez er stad hever; sl.: aezhenn, lifvann.

hewalc'h ag., o keout e walc'h gant nebeut.

hewelenn gg., stummoù diavaez.

hezileizh ag., a c'hell dileizhiñ; dileizhadus.

hezoug ag., aes da zougen, da zezougen.

hezouqder g., doare un dra hezoug.

himalayal ag., db. an Himalaya.

hinad g., hin dibar ul lec'h; doare hin dibar.

hinal ag., db. an hin.

hinonet agv., db. ul lec'h, ma vez brav an amzer.

hiradveridiqezh gg., adaozidigezh e-pad pell amzer.

hirvezañs gg., bezañs e-pad pell amzer.

hirwienn gg., hir ar gwiennoù anezhañ.

hirzarempred g., darempred etre lec'hioù pell an eil re diouzh ar re all; sk.: an aershentoù a vez pleustret evit an hirzarempredoù diabarzh (Pekin - Lhasa).

hollad g., nep tra, strollad pe gementad, e kement ha m'en seller evel un unvez.

hollbad ag., o padout an holl amzer; sk.: an erc'heier hollbad.

hollek ag., a sell ouzh an holl zegouezhoù pe an holl hiniennoù.

hollekaat v., astenn talvoudegezh ul lavarenn d'an holl zegouezhoù arumm gant ar re ma selle outo da gentañ.

hollegleverezh g., pezh a ra neb a glev an hollad, ha n'eo ket kavrannoù hepken; sk.: hollwelevezh, hollgleverezh eo ar varzhoniezh e-kefver ar gomz-plaen a glask distrollañ, diarannañ.

hollwelevezh g., pezh a ra neb a wel an hollad ha n'eo ket kavrannoù hepken; sl.: hollgleverezh.

houañ sl.: houmañ.

hordennad gg., strobard elfennoù linannek; sk.: hordennad morhentoù an norz atlantel.

hoskad g., darvoud e stumm hosk pe ask en un droclinenn; sk.: e tiskouez hoskadoù diniver aodoù Japan bezañ eus an emsavusañ evit ar mordearezh.

houarneg gg., tachad kondon ma vez kailh houarn.

houarnerezh g., ijinerezh an houarn, dre vras.

houarnhental ag., db. an hentoù-houarn.

houarnouriezh gg., metalouriezh an houarn; ez-strih : metalouriezh ponner an houarn, o treuzfurmif ar c'hailh e potin hag e dir.

houarnva g., tared dindan ijinerezh an houarn.

CH

chivous ag., kriz hag o kemer plijadur en e grizder.  
chivoustad gg., doare unan chivous.

C'H

c'hweldreif v. (Km. chwyldroi), treif war an unan.  
c'hweldro gg., tro war an unan; an treif war an unan.  
c'hweldrouis ag., a c'hell c'hweldreif.

I

ijinenn dre vurezh gg., ijinenn o vont en-dro diwar gremm ar vurezh dour.  
ion as. -enn, atomenn dredanvec'hiet da heul koll pe gonit elektron.  
iridiet agv., kendeuzet gant ur c'hementad bihan a iridiom.  
iridiom g., (Ir; elfenn nn. 77; tolz atomel = 192,2; douester = 22,54; teuzverk = 2 443<sup>o</sup>) metal rouez a gaver en hevelep kailh gant ar platin; an harzusañ ouzh ar c'hriagnerezh a anavezet.  
isarnesaet agv., db. gwerzhadoù bezus ur muzul, an hini vihanañ; ko.: uc'ha arnesaet.  
iskelc'henn gg., zann gela'hiek hag unledred eus gorreann an Douar, strishoc'h eget ur gela'henn; sk.: an iskelc'henn c'houdrovanel.  
isdiorreet agv., db. ur vro warlerc'hiet ar gedvuhez hag an armerzh anezhi; hv.: amziorreet, sl.: diorreet, diorren.  
isagaet agv., o tegemerout re nebeut a voued.  
istor-kontañ sl.: hanez

chivous

istor-tonkañ g., an Istor sellat evel an un dra gant hor buhez, hon tonkad, an Istor a zo bev dindan hon treid ha digor dirazomp, hv.: istor tonkadel.

Izelmazon gg., lodenn izelañ ar stêr Amazon.

izelbriz ag., a zo izel o briz; a nebeut talvoudegezh.

izeldourvezh g., marevezh an dourioù izel en ur stêr.

izelc'hopr ag., o tremen gant goprou distar.

izellemm ag., bihan sav ar c'houezh dour ennañ, sk.: greanti tredan izel-lamm Donzer-Mondragon e Frañs.

izelvec'h ag., db. kailh, izel beoc'h ar metal enno.

izelwask ag., a zo bihan ar gwask ennañ.

izelwask g., gwask bihan e-keñvez gwaskoù all; sk.: e Susina e teu glav ha latar diwar izelwaskoù o loc'hañ hed-hed tal-blein an adkelc'houdenn.

Y

yak g., doare bual lost-marc'h o vevañ e menazioù Kreizazia.

yanhinet agv., db. lec'h, ma vez yen an temz-amzer.

J

jaoiañ v., muzuliañ dalc'hed ul lestr, un donell, h.a.

joul g., unanenn labour; labour sevenet gant un narzh kendalc'hel un newton krefvder pa zilec'h e bëent-krog eus ur metr war e roud, J.

jut as. u.: -enn (Sanskritag : juta), plant India, 'corchorus capsularis', danvezet er gwiaderezh ar gwiannoù anezho.

jut g., danvez gwiadal tennet eus ar plant jut.

o

jut

labour g., (Fiz) mentenn gevatal d'ar gramm, gramm danvezet d'ober un dra bennak; mentad termenet evel liesad krefvder an nerzh dre vannad an dilec'hiadur war roud an nerzh, W = FL, atalad mentawouriezhel : W = ML<sup>2</sup>T<sup>-2</sup>.

labourder g., anv-rumm ar mentadoù, hag ar mentenoù keñverek, deveret dre rannadur eus ar ventad labour, sk.: al labourder amzerel, pe c'halloudezh, rannad al labour dre an amzer.

labour-herzel g., labour pa vez an dilec'hiadur a-c'hindu d'an nerzh.

labour-loc'haf g., labour pa vez an dilec'hiadur a-untu gant an nerzh.

lakadur g., db. ur c'hoef, h.a., al lec'hiadur, an durc'hadur anezhañ en egor, e-keñver korfoù all, h.a.

laezhaj g., meuz-boued graet gant laezh.

laezhrann gg., tachennad vro ma vez maget chatal-laezh.

lemadur g., jedadur dre lemel; sl.: lemel

lankad g., (Fiz) mentad termenet evel liesad krefvder un nerzh dre bellder e roud diouzh un ahej-g'hwelldreif pe diouzh roud un nerzh all; atalad mentawouriezhel : ML<sup>2</sup>T<sup>-2</sup>.

landerzh g. (kv. Br.: lân(v), tarzh), barrenn o sevel e dourioù un aber diwar emdourad ar stêr hag al lenv.

landreantiz gg., doare neb a gemer e blijadur en arouaregezh.

lanfas-koad as., aozed diwar goad, danvezet da oberiañ papex, h.a.

lanfas-prann evel lanfas-koad.

laterit g., pri ruz pe c'hell, prl. blot ha puzuilh, pinvidik en houarn, kavet war c'horre reier en Indez, Arabia, ar Sahara.

led g., ment an egor, keñverek ouzh ar roud anadennel a-dreuz, eil ha diwezhañ ment ar gorreded, eil ment an ec'heder, sl.: egor.

ledenn gg., unan eus an deveannoù kensezrh, douget war an ahel, lavarret a-dreuz, Ox.

ledred g. (Km.: lledred), pellder ur poent diouzh ar c'heheder; ko.: hedred.

ledredenn gg., kelc'h kenstuz gant ar c'heheder.

Le-Folander g.-g., gouestl faaldad da Roue Breizh-Veur, h.a.

legumeq gg., lec'h ma c'honezer legumeq.

lec'hemplegadur g., amplegadur o tennañ d'an doareoù-lec'h; sk.: lec'h amplegadur ar porzhioù : amplegañ a ra diwan ha kresk ur porzh un niver doareoù-lec'h.

lec'hhelezh gg., ar bezañ lec'h; parzh bezañ lec'h.

lec'hiad g., (Men) lec'h spiseus ma emañ un elfenn bennak, ur poent da sk.

lec'hiadur g., al lec'hiañ; disoc'h al lec'hiañ; lec'h ma emañ un dra, pe ma teu ennañ.

lec'hiañ v., lakaat en ul lec'h; spisañ lec'h udb., hv.: spislac'hiañ, delec'hiañ.

lec'hiot agv., (Men) a zo en ul lec'h spis pe spiseus.

lec'hidur gg., lec'h laun a lec'hid.

lemel v. (Jed) tennañ ur g'hemetad diouzh ur c'hementad all, sk.:

5 - 4 = 1, a lenner : pemp maea pevar zo (par da) unan, sl.: diforc'h, maes.

lenn-aozañ-listri gg., lec'h, en ur porzh, ma lakaer al listri e-etre an-dro.

lennaouek ag., db. un dachennad douar, ma'z eus meur a lenn.

lennegzh gg., gouiziogozh, dh.db. al lizhiri-kaer, hv.: lennegouriezh; arz skrivañ oberoù lizhiri-kaer; anv roet d'an holl oberoù lizhiri-kaer, hv.: lizheradur, studi an oberoù lizhiri-kaer, hv.: lizhergeouriezh; stumm spered diwar blaustriañ war an oberoù lizhiri-kaer, hv.: lennekted, lennegiezh.

lentardenn gg., maouez lent.

lerc'hiad g., strollad elfennoù lerc'h-ouzh-lerc'h; en enep da heuliad, ne emleg ket lerc'hiad dre ret un ere etre an elfennoù, sk.: ar sonaozour a gleve lerc'hiad trouzoù ar c'head evel un heuliad sonioù.

lestrez gg., strollad listri.

lestresaverezh g., kevran an ijineriezh oc'h ober war-dro ar sevel-listri.

leunaskor ag., o taurel an askorad uhelañ; sk.: traif a ra dizahan ha leunaskor kaladurioù Amerika.

leviadenn gg., kemennadenn a-berzh ul Levierzh-Stad.

leviadur g., doare dibar da ren ur Stad pe ur gevran obarerezh; sk.: Leviadur an Digreizennañ.

levier g., neb a zo en e gefridi ren a-berzh Stad, h.a.

levierezh g., obererezh leviañ, gouarn, ren; al Levierezh, ar renererezh Stad en ur riez.

levierezhel ag., db. levierezh, pe al Levierezh.

lezel e-maez kont v.gl.gg., (Fiz) er jederezh diwar muzulioù, chom hep kontañ elfennoù 'zo, da sk. ar re a denn da sioù an dafar arnodif; sk.: pa'z anafmer kevandalc'h al labour gant an ijinennoù eun e ranke lezel e-maez kont ar rimadurioù.

lezroue g., pennadur lakaet e ples ar Roue pa vez hemañ minor, klañv pe ezvezent; al Lezroue pe ar Rejant, Dug Filip Orleañs, lezroue frañs e-pad minorelezh Loëiz XV etre 1715 ha 1723.

likant ag., db. ur benveg-muzuliañ, o lakaat anat kennoù bihan er c'hementadoù muzuliet.

likantiz gg., perzh ur benveg likant.

lidkoroll g., lidoù hudal pe kravezel e stumm koroll.

lies gl. o verkañ al liesaat, aroueziet : X, sk.: tri lies pevar zo daouzek,  $3 \times 4 = 12$ .

liesaat v., sammañ un niver A outañ e-unan un niver B a wezhioù, sk.: liesaat eizh dre zaou a zo sammañ eizh ouzh eizh.

liesad g., niver disoc'h diwar ul liesadur.

liesadur g., al liesaat; jedadur liesaat.

liesaad g., an niver A a sammer outañ e-unan el liesadur; sl.: liesaat.

liesaer g., an niver B a wezhioù ma sammer outañ e-unan an niver liesaat, sl.: liesaat.

lieskement g., niver a zo ennañ lies gwazh un all, sk.: 50 a zo ul lieskement eus 10.

lieskementel ag., db. lieskement; db. pouezioù merket a-uc'h d'ar gramm.

lieselfennek ag., a zo meur a seurt elfennoù ennañ, sk.: lieselfennek eo poblador Suamerika.

liesgonid g., gonidegezh lies seurt plant en ul lec'h.

liesprantadek ag., db. un oberidigezh, un emdroadur, h.a., a zo kasat da benn dre veur a dennad, sk.: liesprantadek e vez oberiañ ar bara diwar ar gwinizh.

liesseurtaat v., mont pe lakaat da vont liesseurt.

lietaleg gg., (Men) lun teizmet kloz bevnet gant liastuegi.

lietueg-harpañ g., (Fiz) db. ur c'horf harp ouzh ur c'horreann, lietueg argeinek a zo dezhañ da vegoù poentoù-harpañ eus ar c'horf hag o

terc'hel en e ziabarzh an holl re all.

liant g., glaou karrekaol, eus ar re baouzañ e karbon, nebeut implijet evel danvez-lekif, hogen danvezenn grai pouezus d'an ijinerezh, hv.: prenglaou.

linkridigezh gg., ar mont linkr; disleberidigezh, dirollerezh, gwallvuhez-egezh.

linenn gg., nep elfenn na deu e penn-kont nemet ar regenhelezh anezhi, sk.: tresañ ul linenn war ar paper, ul linenn ballgomz, ul linenn dreuzatlantel.

linennek ag., diouzh, diwar-bouez linennoù.

lifvel ag. (kv. Er.: lifvañ, Km.: hylif), db. ar c'horfoù a gamer stumm al listri o dalc'h, ha na zigresk ket o ec'honad p'o gwasker.

lifvenn gg., danvez er stad lifvel.

liorzhel ag., db. liorz pe liorzhañ, sk.: ar gonit-douar, hag eñ azot ez-liorzhel kentoc'h.

liorzhererezh g., obererezh liorzhañ.

lipid as., renkad danvezennoù bevgeniek, o c'horvezout eus an druzennoù hag an aesteroù diwarno.

lizheradur g., danvez-lenn, sk.: kreskiñ a ra a-fonn al lizheradur war skiantoù an atom; kv.: lennegezh.

lizheradurezh gg., studi an danvezioù-lenn.

loervezegel ag., db. mezekniezh al loened.

loqell gg., tachennig douar.

loc'hann gg., barronn veñtal o talvezout da zibradañ summen ponner.

loc'hell gg., kement ijinenn o loc'hañ.

loc'hvan g., lec'h ma loc'her dioutañ.

loc'honiñ ag., db. loc'honiezh.

loc'honiezh gg., studi loc'hañ ar c'horfoù dindan wered an nerzhoù.

Notenn.— Kevrennoù pennañ al loc'honiezh zo : ar savoniezh, studi kompouez ar c'horfoù a-sav, an nerzhoniezh, studi ar c'hañver etra al loc'hañ hag an nerzhoù, ar fivfoniezh, studi doareoù al loc'hañ dioutañ e-unan.

lorc'hañs gg., doare-bezañ pompadus oc'h epaouiñ an estlamm, an doujañs en arvesterion, sk.: a henvoaz emañ e frañs politikerezh al lorc'hañs.

lourell gg., (Mustela lutreola) loen eus strollad ar marded, anvet ivez

pu-dask dour, hemolc'het evit e feur.

luniañ v., diskouez diwar-bouez lun, lunioù, sk.: luniet e vez gant an neudenn-blom roud-gwerodif pouez an traol; stummañ ez-welus, sk.: serzh e vez ar c'horn luniet gant an neudenn-blom ha gorre an dour.

luniadur g., al luniañ; disoc'h al luniañ, sk.: ur gartenn douaroniezh a vez luniadur gorre an Douar.

luoz g., lu, arme.

luskelladenn gg., en ur monedone reoliek, an elfenn o c'hoarvezout eus ur voneadenn hag un donadenn.

luskelladek ag., o reif t're d'un oberezh luskellat, sk.: an elektronik a zo studi ar rehantoù luskelladek.

luskellat ag., o luskellañ, aroueziet gant luskelladennoù.

luskellat v. eval luskellañ.

luzern as., legumineged gonezet evel boued-chatal.

## M

madoù ls.(g.), komant tra a c'hell bastañ d'un ezhomm bennak eus mab-den ha bezañ perc'hennet.

madoù-aveif ls.(g.), madoù (ardivinkoù, h.a.) ret da vont-en-dro un embregerezh, ur gevran-armerzh, h.a.

madoù-beveziñ ls.(g.), madoù o vastañ ez-eaun d'un ezhomm, da sk. an danvezioù-bevañs, an dilhad, hv.: madoù eeun.

madoù-kenderc'hañ ls.(g.), madoù ne vastant da ezhommoù mab-den nemet dre hantererezh ar madoù-beveziñ a roont an tu da genderc'hañ, da sk. douaroù, greantioù, hv.: madoù ameeun.

maen-sked g., maen a liv, pril. treuzwelus, danvezet da vrageriz.

maes gl. o verkañ al lemel, aroueziet : - , sk.: tri maes d'aoz unan, 3 - 2 = 1.

maesvec'hiad g., tredanvec'hiad aroueziet maes - .

maezkalvezel ag., db. kalvezerezh al labour-douar.

luniañ

maezkalvezel ag., db. kalvezerezh al labour-douar.

maezkêr gg. kêr a zo hec'h armerzh e dalc'h kenderc'h ar maezioù tro-dro dezhi.

maezhur v. sl.: maañ.

magnetiñ g., kailh houarn (houarnoksidenn Fe<sub>3</sub>O<sub>4</sub>) danvezet da ober ar gwarelloù naturel.

magnezium g., (Mg; elfenn nn. 12; tolz atomek = 24,32; douester = 1,74; teuzverk = 651°) metal gwenn, o tevin gant ur flammenn gann.

maizrann gg., tachennad v'io dindan c'honidigezh ar maiz.

manganéz g., (Mn; elfenn nn. 25; tolz atomek = 54,93; douester = 7,20; teuzverk = 1260°) metal kalet, torrus, danvezet ar c'hendeuzadurioù da galestat an diroù hag an aremoù.

mann ag. & g., sifrenn oc'h aroueziañ an ezvezafs a wezhad.

mannel ag., par da vann.

mannvec'hiad agv., hep bec'hiad tredan warnañ.

marc'h-galloudezh g., unanenn c'halloudezh kozh, boeziet c'hoazh evel unanenn-dremen, par da 75 kilogramm-metr dre silenn (kgm/s), dambar da 736 wat (W), aroueziet MG (CV ha Ch e galleg, PS en alamaneg); an unanenn vreizhveurat HP a zo dambar da 746 W.

marc'h-houarnour g., neb a ya war varc'h-houarn.

marvbouez g., er muzulioù dre ventel, en atalbouezañ da skouer, pouez a lakaer war unan eus ar balañsoù ha na vez ket fivvet a-hed ar pouezadennoù.

mazout g., dilerc'h rannstrilhidigezh an tireoul, danvezet da halosk pe da drelosk, uc'h 350° ar berverk anezhañ.

mainel ag., db. danvezioù divev an Douar.

melezourdi g., labouradeg ma oberier melezourioù.

melezourer g., neb a ra pe a wezh melezourioù.

menegadur g., ar menegif; disoc'h ar menegif, sk.: ur ventel vat a dia bezañ felan, eleze reif menegadurioù heñvel evit pouezioù par.

meneziaq gg., strolled fetis a uhelennoù.

mentad gg., kementad ur ventenn, sk.: ar wrezad zo mentad ar wrez.

mentacuek ag., un pe lies ment dezhañ.

mentawour g., neb a oar diouz mentawouriezh.

mentawour

mentawouriezh gg., studi ar mentif hag ar mentennoù.

mentawouriezhel ag., db. mentawouriezh, sk.: atalad mentawouriezhel an tizh a zo :  $v = LT^{-1}$ .

mental gg., benveg da vuzuliañ pouezioù dre o c'havetriañ gant pouezioù pe nerzhoù anavezet.

mentelad gg., kont an dle hag ar c'haoud eus ur c'henwerzher.

menteladur g., ar mentalañ; disoc'h ar mentalañ.

mentelañ v., kempouezañ an dle hag ar c'haoud, pe an dle hag ar c'hred.

mental-baeañ gg., kempouez etre dle ha kred e-keñver prenañ, sk.: ur gwall-samm eo an enporzhioù tireoul ha glaou evit mental-baeañ Argentina.

mentenn gg., komant a c'hell bezañ anavezet dre werzhadoù.

Notenn.- Daou rummad mentennoù fizikel a zo : ar mentennoù muzuliadus, a zo o gwerzhadoù kementadoù fizikel, sk.: an ec'honnennoù, ar wrez, ar mentennoù merkadus a zo o gwerzhadoù kementadoù jedoniezhel hepken, da sk.: ar gwrezverk.

merkadus ag., a c'hell bezañ dewerzhñ diwar-bouez ur skeul, hep bezañ dre zot muzuliadus, sk.: ar gwrezverkoù a vez merkadus, na vezont ket muzuliadus.

merinoz g., doaread macout spagnat maget evit e c'hloan fonnus.

merzhout sl.: merzout.

maskad g., kenaozad lies korf hep ereoù kimiek etre o molekul.

meskalon gg., heug, dofjer, balag; sk.: bet en deus Maodaz Glanndour a-viskoazh euzh ha meskalon ouzh ar glouarded.

metalaozerezh gg., greanti oberiañ traezoù metal.

metaloidenn u., sl.: divetal.

metalouriezh gg., ijineriezh ar metaloù.

metalouriezh pervezh gg.ag., rann ar vetalouriezh-pleuskaf, anezhi ober-  
iataerezh binvioù ha gwikefrepoù a zesister, sk.: ourierezh, tredanerezh.

metalouriezh-pleuskaf gg., kevrenn ar vetalouriezh, anezhi oberiataerezh diwar aozedoù ar vetalouriezh ponner, dir, potin, h.a., traezoù a bop seurt "adalek ar mordreizher treuzatlantel betek an nadoz wriat"; hv.: metalouriezh skafv.

metalouriezh ponner gg.ag., kevrenn ar vetalouriezh, anezhi treuzfurmerezh ar c'hailh houarn o potin hag e dir; hv.: houarnouriezh.

metoù g. metacuoù, didorrenn m'emañ un dra enni.

metr g., unanenn regad, tazmenet evel 1 650 763,63 gwezh hed-gwagenn ar skinañ keñverek ouzh an tremen etre al liveoù 2 P10 ha 5 dg an aton kripton 36; arouez : m.

meurdi g., ti bras ha kenadec, palez, dinazenn.

meurqêr gg., kêr vras ha galloudek.

mezell ag., a c'hell kemmañ stumm dindan ur gwered diavaez, evel ar gwask, ar wrez, h.a. ha mirout ar stumm nevez goude peouez ar gwered; hv.: plastikel, mezallus.

mezoll g., danvez mezall, hv.: plastik.

Notenn.- Tri rumm mezelloù a zo : ar mezelloù a orin struzhel pe loenel, ar rousinoù kevanaozel gwrezkaletus, ar rousinoù kevanaozel gwrezvezellus.

mezellaat v., mont pe lakaat da vont mezall; intrañ, golveañ, h.a. gant mezall.

mezellien g., lien mezelleat.

mildammañ v., lakaat e bruzun, breviañ.

milinerezh gg., labouradeg valañ an ed.

milourel ag., soudardel.

mirlec'hiañ v., staliañ marc'hadourezh en ul lec'h a-ratozh.

mirleñ gg., lenn kempennet da zegemerout dourioù ur stêr da vare an esorc'h.

moerhefvel ag., db. bri ur menez, serzh ha stankus evel ur voger.

molekulenn u., stroll atomennoù erc'het kenetrezo diwar-bouez o elektronn.

monedenn gg., gwezhad vont; an ur monedone, komant tremen eus al lakadur paouez d'al lakadur pellañ.

monson g., avel vareadek, prl. c'hwec'hmiziek, o c'hwec'haf war Suezia.

morkreizel ag., db. Mor-Kreiz, da sk.: an hinad morkreizel.

mordeol ag., db. ar mordreozh, da dre vras an darempredoù dre vor.

mordreerezh g., obererezh mordeañ, beajerezh dre vor.

morderiñ merdeañ v., beajiñ dre vor.

morgablus ag., ennañ ar santadur dispis da vezañ kablus.

morgablusted gg., doare unan morgablus, sk.: bez' a taolenn ar ger "lor" moarvat klouarjenn ar vuhez pemdeziek, sioul, diyoul, met kemmesket enni morgablusted al leziregezh digas.

morgem g., kamm bihan, azliv, arliv.  
morhent g., hent dre vor; sl.: douarhent.  
morhental ag., db. an hentoù-mor.  
morhenterezh g., obererezh darempredif an hentoù mor.  
morhefvel ag., hefvel a-walc'h, diwar-bouez nebut, damhefvel.  
morianannezet agv., poblet gant tud du.  
morlinenn gg., hent-mor oc'h eren daou pe lies porzh, bro, h.a.  
morlizadur g., beviganed en arlug o dour ar mor.  
morsilat v., reif da c'houzout hep lavarout plaen ha skleer.  
morvroad g., annezad un anezenn, dh.db. enezennoù bihan ar Maurvor Habask.  
mui gl. o verkañ ar sammañ, aroueziet : +, sk.: tri mui daou zo pemp,  
 $3 + 2 = 5$ .  
muivoc'hiad g., tredanvoc'hiad aroueziet mui +.  
mulzen g., hiron diwar un tad du hag ur vamm wenn, pe un tad gwenn hag ur  
vamm zu.  
muzuliadenn gg., gwezhiad vuzuliañ; an disoc'h anezhi.  
muzuliadus ag., a c'heller muzuliañ, sk.: ar gorreadoù a vez muzuliadus,  
ar gwrezverkoù na vezont ket, sl.: markadus.

N

nant gg., traonienn hir ha bas.  
naou g., (Mañ) dilive dre regad unanenn : bezet ar regenn  $\frac{AB}{AB}$  goun AB, al liye  
a-zremm AH, H o vezañ bannad B, an naou a vo ar feur  $\frac{AB}{AB}$ , pe sin BAH.  
naoz gg., (Tel) kement stummadur evit degemer ur pezh o kemer harp warnañ,  
sk.: naoz ar ventel, harp warni silh an aotenn-greiz.  
nerzh g., mentenn fizikel, kement a c'hell lakaat ur c'horf da germeñ stumm  
pe loc'h; mentad fizikel termenet evel liesad un tolz dre ur buanaat,  
atalad mentawouriezhel :  $F = MLT^{-2}$ .  
Notenn.- An nerzh-mentenn a vez episnet gant ur roud-gweredif, un tu,

morgem

ur poent-krog, ur c'hrefvder; an nerzh-mentad a c'hoarvez hepken eus  
kementad ar c'hrefvder.  
nerzhoniezh gg., kevran eus al loc'honiezh, studi ar c'hafeverioù etre al  
loc'hañ hag an nerzhoù.  
nerzh-rimiañ g., nerzh o hezzel ouzh loc'hañ ur c'horf harp ouzh ur c'horf  
all, o tiwanañ dre bezh ar rimiañ etrezo.  
nerzhventer g., benveg dre winterell da vuzuliañ krefvder an nerzhoù.  
neudenn-blom gg., neudenn stennet gant ur c'horf ponner, boaziet da luniañ  
ar roud a-zerc'h.  
neunnad g., (kv. Br.: neu(fv)), lusk-disluk.  
neunnus ag., lusk-dilusk ennañ.  
neutron as. enn, rannigoù manvec'hiet a zo e darc'hanoù an atom.  
neuzenn gg., skouer arouezidik, stumm skouer, sk.: liessaurt eo an neuzennoù-  
tud e Sina.  
nevedoniezh gg., studi an hengounioù nevet; hengounioù nevet ur vro, ur  
bobl, h.a.; sk.: an nevedoniezh keltiek.  
nevezembroet agv., daoust agentaou da annezañ en ur vro.  
nevid g. (Brh.: nouitio, Km.: newid), hollad ar c'hinnigoù hag ar goulennoù  
en ul lec'h, pe e-kefver un danvez, sk.: nevid ar Stadoù-Unanet, nevid  
an tirsoul.  
nevidiour ag. & g., (dan) oc'h ober war-dro traoù nevid; (bro) ma vez enni  
nevid e-kefver un danvez.  
nevidva g., kreizenn nevid; lec'h ma vez nevid e-kefver un danvez.  
newton g., unanenn nerzh, nerzh a laka war ur c'hilogramm ar buanaat-unanenn,  
da lavarout eo ar metr-dre-eilenn dre eilenn, N.  
nezaden gg., labouradeg nezañ.  
nezour g., unan a oar diouzh ijinouriezh an nezañ; greantiour an ijinerezh  
an nezañ.  
nikel g., (Ni; elfenn nn. 28; tolz atomel = 58,69; douester = 8,9; teuz-  
verk = 14520) metal amezek d'an houarn, kalz harzusoc'h egetañ avat  
ouzh ar c'hignerezh, danvezet dreist-holl d'ober kendeuzadoù, da sk.  
an diroù dre nikel.  
nilofis g., seiz kevaneozal o c'hoarvezout eus poliamidennoù.  
niveraden gg., gwezhiad niverif poblañs ur riez, h.a.  
niverel ag., db. pe diwar-bouez niveroù.

nerzhoniezh

norzel ag., en norz; o tennañ d'an norz pe d'ar pezh a zo en norz, sk.:  
hinad norzel, neuzeñ-den norzel.  
norzelaat v., mont d'an norz; mont pe lakaat da vont norzel.

0

oberata v., embreger ez-hentennek un emell kemplezh.  
oberatadenn gg., gwezhiaid oberata; an disoc'h anezhi.  
oberatadur g., an oberata; disoc'h an oberata.  
oberataer g., neb a oberata.  
obererezh g., pleustrezezh ur galloud ober, sk.: kelennerezh a zo obererezh  
kelenn; labour un organenn, sk.: obererezh ar galon a zo lakaat ar  
gwad da redek; hollad an embregadurioù e-keñver un emell, sk.: an ober-  
erezh sindikadel; aozadur e-keñver un emell, sk.: an Obererezh Katolik.  
oberiadegezh gg., perzh oberiat, sk.: uheloc'h e vez oberiadegezh an Amerike  
aned eget hini Europiz; doare an obererezhioù gant un den, en ul lec'h,  
sk.: fastus eo oberiadegezh micherourion ar greantioù arnevez; hollad  
obererezhioù un den, ur gêr, h.a., sk.: war astenn emañ bepred ober-  
iadegezh Sao-Paolo.  
oberiañ v., sevel traezoù, danzen kenderc'hadoù, h.a., sk.: gwerzhour bras  
traezoù oberiat eo Japan.  
oberiata v., kenderc'haf traezoù, danvezioù kenwerzh, h.a.  
oberiataerezh g., embregerezh oberiata.  
oberiataour g., neb a oberiata; greantour oc'h oberiañ traezoù kenwerzh,  
sk.: kevredif a ra oberiataourion tankirri Europa da harpañ ouzh kevez-  
erezh re Amerika.  
oberidigezh gg., en ober; an oberiañ.  
oberiek ag., a zo dezhañ gwered, efedoù.  
oberigezh gg., perzh oberiek; gwered udb. oberiek, sk.: gwered ar goell a  
c'hoarvez en oberigezh kimiek ar garvavion a zo ennañ.  
orc'hid as. -enn, kerentiad unhaddelienneged, gonezet evit o bleunioù.  
orjienus ag., db. ur metal, a c'heller neudennañ.

P

palem g., danvez-kivij.  
Pampa g., kompezenoù goetek oc'hon Suamerika etre an Andez hag an Atlantel,  
sk.: kompezenoù oc'hon ar Pampa, hep gwez, hep traoniannoù, hep dour-  
sav, a zo anezho ur gwiskad tev a lec'hid-avel deuet e stumm uloc'h  
diwar atiloù krin diabarzh ar c'hevandir e-doug ar milvedoù.  
paoterek ag., puilh kenan, a dolzenadoù bras, sk.: lamgresk ijinerezh  
kanadian an aluminiom a zo bet un heuliad da enporzhioù paoterek  
balzit eus Gwiana.  
paouez g., stad diglach, a-sav, sk.: ur winterell a zo dezhi 10 cm hed er  
paouez.  
par ag., kement-ha-kement, keit-ha-keit, h.a., sk.:  $\frac{1}{2}$  ha 0,5 a zo par.  
par da gl. o verkañ ar parder, aroueziet : =, sk.: tri mui daou zo par  
da bemp,  $3 + 2 = 5$ .  
parder g., bezañ par; perzh ar bezañ par.  
pavilhon g., tiadur skañv; eilti a-kichen unan brasoc'h; sk.: Burev Etre-  
vroadel ar Povezioù ha Muzulioù a zo e-barzh Pavilhon Breteuil, e kêr  
Sèvres, Frañs.  
paennadif v., bezañ pe lakaat lerc'h-ouzh-lerc'h war-bign pe war-ziskenn  
evel pazennoù un diri.  
pechezeq gg., lec'h dindan waz-pechez.  
pellennek ag., (Men) e stumm pellenn.  
pellveajour g., neb a ra boajoù hir.  
pellvleac'h g., ren ur benveg, un ijinenn, a-bell diwar-bouez ul lievataerezh  
treloc'hel, tredanel, h.a.  
pengennadur g., ar pengennañ; disoc'h ar pengennañ.  
pengennadus ag., a c'heller pengennañ, sk.: un gindaouad ne vez ket pengenn-  
adus.  
pengennañ v., savelañ an nerzh kevatal e wered da wered ur reizhiad nerzhoù.  
pengennat ag., bet dre bengennañ, sk.: gwered pengennat ur strollad nerzhoù  
a vez peurliosañ kevatal da wered un nerzh hepken.  
pengennerzh g., nerzh bet dre bengennañ, sk.: daluniet e vez ar pengennerzh  
diwar daou nerzh kengrog gant trouzvegenn ar genstureg savet war ar

pengennerzh

norzel

sturiadelloù o teluniañ an daou nerzh.

pennaenn gg., elfenn bennañ, pennañ tra; lakadenn bennañ, sl.: pennvon.

pennkarrek ag., db. silabenoù ur ger, an hini eildiwezhañ.

pennkarrenn gg., silabenn eildiwezhañ ur ger.

pennrenk gg., ez renk kentañ, a-touezh ar re pouezusañ, sk.: ar c'hafe a zo e pennrenk kenderc'hadoù Brazil.

pennvon g. (kv. Br. Km.: bon), lakadenn diazez; diazez kentañ; kv.: bon, pennaenn, pennabeg, pennsturienn, pennwirionez, penndiazez, kentaenn, h.a.

perlez-stuz as., perlez lakaat ez-kalvezadel da ziwanaf e-barzh an istr.

peurardivinkaet v., kas da benn an ardivinkaet; ardivinkaet en e bezh; sk.: peurardivinkaet e vez gonidigezh astennidik ar gwizh en Amerika.

peurbengannerzh g., pengannerzh hollet ur reizhiad nerzhoù, kevatal e wered da wered ar reizhiad en he fezh.

peurhollekaet v., kas an hollekaet d'ar pep pellañ, sk.: da beurhollekaet, e-lec'h un nerzh kendalc'hel e grefvder hag un dilec'hiadur eenregekek, e lakaer un nerzh argemmel hag un dilec'hiadur krommregek diforzh.

peurc'honit v., lakaat da dalvezout en e bezh, sk.: evelkent emañ pell c'hoazh a vezañ peurc'honezet barregezhioù Kanada e-keñver tredan.

peurlenkr ag., lenkr kenan, hep an disterañ garvder, hevelep ma c'heller lezel e-maez kont an nerzhoù-rimiañ.

peurvat ag., (fiz) db. un ijinenn, pa vez an askorad par da 1, eleze pa na deu nerzh-rimiañ ebet da skoilhañ ouzh al loc'hañ, sk.: morse na vez peurvat an ijinenoù gwirion, pa vez bapred nerzhoù-rimiañ didec'hus.

peuzdidud ag., hoges digevannez.

pevarhoaled g., pevare oadvezh douarcuriozhel an Douar, an hini ma emamp bremañ.

pimpoeller g., c'hoariell o c'hoarvezout eus ur granann skafv, pegot outi un hanterbellenn bonner : kreiz-kerc'hell ar c'henstroll a vez e diabarzh an hanterbellenn ha mar lakaer ar pimpoeller a-c'hourvez war ur blaenenn a-zremm, e wint davit kempouez.

pirid gg., lec'h dinden wez-per.

pizhlec'hiañ v., lakaat en ul lec'h tezmenet strizh; tezmenañ strizh ul lec'h.

pizhlec'hiet agv., lec'hiet diwar amplegadoù strizh, sk.: pizhlec'hiet emañ ar vatalouriezh penner pe war an houarnegi (Lotringen) pe war ar glaouegi (Ruhr).

pladenn gg., en ur ventel, lestr sklat ma lakaer ar pouezioù pe an traoù da bouezañ, hv.: balaf, skudell.

plaenaat v., studiañ un destenn en ur zisplegañ kement a zo ezhomm evit he feurveizañ.

plaenadur g., ar plaenaat; disoc'h ar plaenaat, rann-studienn ma plaenaer un destenn.

plantadeg gg., ar plantañ graet gant un niver a dud; disoc'h an hevelep plantañ; lec'h, prl. ec'hon, dindan struzh plantat.

plant-krap as., seurtoù plant a sav dre stagañ ouzh ar nogerioù, ar gwez, h.a.

plantalkool g., alkool a orin struzhel, struzhalkool.

planteriz g., ar struzh plantat en ul lec'h, sk.: pa vez azv ar planteriz korz-sukr e c'hopreoster michercurion mulzen hag hiron; al lec'h dindan struzh plantat, sk.: er planterizoù e labour mererion du, diskennidi ar sklaved a-gent.

plastik g., sl.: mezell.

platin g., (Pt; elfenn nn. 78; tolz atomel = 195,28; douester = 21,45; teuzverk = 1773°) metal kalet, orjalenne ha govalius, harzus kenan ouzh gwered an trenkennoù.

pledeadenn gg., breutadenn, prezegenn ur breutaer da zifenn ur gaoc, sk.: e tudigoù Kêr Aten e soñjer kentoc'h, an dudigoù-se a waler taolennet e pledeadennoù Lusias.

pleuskaf v., reif ur stumm, ur pleusk da; oberiañ traozoù diwar metaloù diaoz.

pleuskad g., aozad an ijinerezh-pleuskaf.

pleusklec'h g., lec'h eus ar bed, bro, h.a., ma pleusker un danvez.

pleustr g., an ober anebet ouzh ar preder, ar gweredif anebet ouzh an dazevout, an obererezh boutin anebet ouzh an obererezh lakaet gallus gant ar Skiant, sk.: mentelioù-arnodva 'zo a c'hell keñveriañ deou bouez 1 kg war-nes 0,02 mg; er pleustr avat, e tremener gant mentelioù a vez o resister e-keñver pouezañ 5 kg war-nes un nebeut dekigremmoù.

pleustrek ag., o sellout ouzh an ober, ar gweredif, sk.: un den tuet d'an obererezh pleustrek; a c'hoarvez en oberoù, e gweredoù, e-aer ar c'hentelioù kimiezh a vez aozet labourioù pleustrek; met, tuet d'an ober, d'ar gweredif, sk.: ur spered pleustrek.

poent-krog g., poant eus ur c'horf ma wered un nerzh, sk.: da boant-krog e c'heller dibab forzh pe boant eus roud-gweredif an nerzh gant ma vefe erret digemm ouzh ar c'horf.

ponnerder g., dedennerezh ar c'horfoù war-du an Douar.

postañ v., fiziañ arc'hant en un embregerezh; lakaat arc'hant en embregerezh en eskemm eus gwirioù 'zo warnañ, sk.: broudet e vez greanterezh Kanada gant kovalaoù estren postañ gant fiziañs en un armerzh stabil.

pouez g., nerzh a zedenn ur c'horf war-du an Douar, par e greñvder da liesad tolz ar c'horf dre vuanaat ar ponnerder,  $P = M \times g$ ; muzul merket, dezhañ ur pouez divizet.

pouezadenn gg., gwezhiañ pouezañ.

pouezañ v., muzuliañ pouez udb.

pouezañ eun g.ag., huntann keñveriañ pouez un dra gant pouezioù merket, dre lakaat an dra war bladenn ur ventel hag ar pouezioù war ar bladenn all, sl.: atalbouezañ.

pouezek g., mentenn fizikel, fonnder ur berañ d'ober dre ar pouezioù; mentad fizikel termenet evel rannad ar pouez dre an amzer, pouezder amzerel, atalad mentawouriezhel :  $ML^{-2}T^{-3}$ .

pouezder ec'honel g.ag., mentenn fizikel, douester un danvez d'ober dre ar pouez; mentad fizikel termenet evel rannad ar pouez dre an ec'honel; atalad mentawouriezhel :  $ML^{-2}T^{-2}$ , hv.: pouezder rummel.

pouezder rummel evel pouezder ec'honel.

pouezek ag., db. danvezioù ijinerezh, a zo pouez enno, en arbenn d'o fouezder ec'honel bras, ha d'an ec'honel bras a zo ozhomm, sk.: berzh-mat ur porzh a vez e dalc'h nester ar greantvaou, pergen ar re o kenderc'haf pe o tanzen danvezioù pouezek.

Praden gg., rannbarzh kreiz Kanada etre ar Skoed Kanadian er Retor hag ar Menazioù Roc'hellek er Gernog, o c'hoarvezout eus kompozonoù ec'hon, stu-kanan o atiloù, lakaat brammañ dindan c'honidigezh.

prantad-tremen g., maread etre div amzervezh, daou oadvezh, h.a., sk.: ar reizhiad unanennoù MKSA a zo bet lakaet da etrevroadel e 1961. Ur prantad-tremen a zo ma vezet aotreet c'hoazh d'ober gant unanennoù kozh 'zo.

primeostea gg., lec'h dindan c'honidigezhioù eostek.

prennalao as., sl.: lignit.

protid as., zenkad danvezennoù vebgimiek a gaver e kement tra bev, bras kenan o molekul, hag int dourrannadus en amindzenkennoù; er protid e vez e-tre 50% karbon, 25% oksigen, 15% nitrogen, hidrogen, fosfor, souf, h.a.; pennañ boued e-keñver ar protid eo ar c'hig.

pukadenn gg., un taol pukañ; an disoc'h anezhañ; lec'h izelaet dre freuzhadur ar c'honden.

ponnerder

pukañ v., db. torosennadur, mont pe lakaat da vont izeloc'h dre freuzhadur ar c'honden.

purat v., danzen danvezioù krai, an tizeoul pergen, da zigenvezañ diouto kenderc'hadoù pur, strilheolioù da sk.

purerez gg., greanti purat.

purva g., lec'h ma pureaz; tared dindan burerezioù.

R

raklennadur g., dastumad testennoù, pe ar roll anezho, da lann kent kregiñ gant ul labour.

raklennadurezh gg., evel raklennadur; studi an testennoù da lann kent kregiñ gant ul labour.

raktresaour g., unan a oar diouzh raktresaouriezh, hv.: steunvour, steufvekar.

raktresaouriezh gg., ar sevel raktresoù armerzh, hv.: steufvouriezh, steufvekaerezh; studi ar sevel raktresoù, steufvouriezh.

rakvrezel g., marevezh a-raok ur brezel; ar Rekvrezel, ar marevezh a-raok 1939.

radion g., (Ra; elfenn nn. 88; tolz atomel : 226,05) ar c'horf skinoberiek kentañ dizoloet; eus kerentiad an uranion.

rafcherezh g., magañ loened e buorzhioù bras evel ma vez graet en atantou Kornogamerika pe rafchoù, hv.: buorzherezh.

rann gg., doare da skrivañ ur feur, ur c'heñver etre daou niver dre lakaat an eil, graet anver, dindan egile. graet niverer, hag o tresañ ur varrenn a-zremm etrezo, sk.: er rann  $\frac{3}{4}$  ez eo 4 an anver ha 3 an niverer; da dreñf ur rann en un niver skojal e ranner an niverer dre en  $\frac{3}{4}$  amañ :  $3 : 4 = 0,75$ .

rann gl. o verkaf ar rannañ, aroueziet : , sk.: tri rann pevar zo mann skej 75,  $3 : 4 = 0,75$ .

rannad g., niver disoc'h diwar ur rannadur.

rannad-grem g., kementad bet dre rannañ kenderc'had-grem bloaziek ur riez

rannad-grem

niver hec'h anhezidi, sk.: aveet-mat eo damaniou bras Europa hag Amerika, man e sav ar rannad-gramm uc'h 1000 kWh/annezad.

- rannadur g., ar rannañ; jedadur rannañ.
- rannañ v., lodennañ un niver e kement-mañ-kement a lodennoù par, sk.: rannañ daouzek dre tri zo ober teir lodenn par pep hini da bevar.
- rannbarzh g., tachenhad a zo lodenn un all, sk.: diazad Kastellin a zo unan eus glavekañ rannbarzhioù Breizh.
- rannbennad gg., lodenn ur pennad, prl. aroueziet : §
- rannboelladenn gg., lodenn ur boelladenn.
- ranndir gg., rannad vro.
- ranndirad gg., gorread, dalc'had ur ranndir.
- rannet g., an niver a lodenner er rannadur.
- rann eunenn, gg.gg., rannaeunenn gg., regenn eun.
- ranner g., niver al lodennoù er rannadur.
- ranngelc'h g., lodenn eus gorreenn ur c'helc'h etre daou skin.
- ranngement g., niver a zo lies gwezh en un all, sk.: 0,2 a zo ur ranngement eus 1.
- ranngementel ag., db. ranngement; db. pouezioù merket a-is d'ar gramm.
- ranniq gg., (fiz) eufleñn danvez war loc'h, prl. tredanvec'hiet; ar pennañ rannigoù a zo : ar proton, an neutron, ar rannigoù alfa ha beta, an hiperon, ar mezon, h.a.
- rannstrilhadur g., ar rannstrilhañ; disoc'h ar rannstrilhañ.
- rannstrilhañ v., dispartiañ lifvennoù mesket dre gemer tu er c'hemm etre o berverkoù.
- rannstrilhidigezh gg., oberidigezh rannstrilhañ.
- read g., sl.: tredanread.
- redenn gg., forzh pe anadenn o c'hoarvezout en un dilec'hiadur padus aus ul lec'h d'un all, sk.: ar redennoù kanwerzh etre Europa hag Amerika.
- redreuzus ag., a vez traouzet re aes, sk.: redreuzus eo al leus evit bezañ stu dindan an hinadoù sac'h.
- rell gg., korf heren ouzh an tredan; neudenn vetal danvezet da ren ar red tredan.
- regad g., kementad ur regenn, mentad termenet evel hed ur regenn, atalad mentawouriezhel : L.

rannadur

- regder g., (Prd) doare-bezañ regek; (Jed) lec'helc'h regek, egorunvent; (fiz) anv-rumm ar mentadoù, hag ar mentennoù kaffverek, dezeret dre rannadur aus ar rugad, staladoù mentawouriezhel : LX-V, sk.: an tizh, pe regder amzerel, LT-1.
- regek ag., db. un doare-bezañ en egor, savelet da sk. gant roud loc'hañ ur c'haled.
- regel ag., stumm doareañ mentawouriezhel o venegin : rannet dre ur regad, XL-1, sk.: an tolzder regel, ML-1.
- regenn gg., mentenn fizikel, hinienn regder, dezhi da vent an hed.
- regennek ag., dezhañ doare ar regennoù, sk.: un deluniadur regennek eo ar sturiadell.
- regennel ag., dezhañ perzhioù ar regenn.
- regennelezh gg., perzh regenn, sk.: ul linenn a zo un elfenn na deu e penn-kont nemet ar regennelezh anezhi.
- rehent g., heulriad didorr a reelloù oc'h eren daou vlein ur ganer tredan.
- reherder g., hardisegezh diboll, embrogustad diwar re emfiziañs, sk.: martezo eo c'hoarvezet da Argentina dreistpriziañ ha barregezh ha faziañ dre reherder.
- reion g., seiz kalvezadel oberiet diwar un aketat keluloz.
- reizh ag., db. ur benveg-muzuliañ, o reizh muzulioù dik, sk.: reizh eo ur ventel mar chom e kempouez pa sammer he fladennoù gant pouezioù par.
- reizhder g., perzh ur benveg reizh.
- reizhenn gg., reolenn, a yezhadur da sk.
- reizhiad gg., strolled elfennoù lakaet diouzh ur reizh, sk.: reizhiad nervek, reizhiad an hentou; ar reizh m'emañ diouti an elfennoù en ur reizhiad, en un ijinenn, h.a., sk.: reizhiad ar c'hrog-pouez dre loc'henn a gaver ivez er pouezerezhioù.
- reizhiadek ag., db. ur reizhiad; urzhiet diouzh ur reizhiad.
- reizhvarn ag., dik e zoare da briziañ an dud, an degouezhioù, h.a.
- ren v. rebet, kas (an tredan, h.a.).
- refver g. (GReg.: refver), ar re a zo aus un dra.
- refverad g., ar re a zo aus un dra; db. arboellarezh, ar pezh aus kenderc'h un danvez na vez ket bevezet gant ar vro ganderc'her, sk.: Indonezia, Kreizamerika ha dreist-holl ar Reter-Nesañ, en o c'hezh refveradoù uhel, a vez darbarerion Europa, homañ o kenderc'hañ nebeut hag o vev-ezif kalz.

refverad

reolerezh g., obererezh reolif.

reolif v. (Km.: rheoli), kontrollañ, ran war, sk.: liesseurt pobloù Suamerika, hag int dindan 21 riez, hep kontañ an tiriagozhioù reolet gant Breizh-Veur, Frañs hag an Izelvroioù.

reollun g., addisplegadur ur meizad, ul lezenn fizikel, h.a., diwar-bouez arouezioù divizet.

reollunif v., lakaat e stumm reollunioù.

reterpellaad g., annezad ar Reter-Pellañ, aleze Japan, Sina, h.a.

rezid g., stad an den, ar vro, h.a., na vez warno mac'herezh ebet, hv.: frankiz, dieubiezh, dishualded, h.a.; doare an den na vez war e vuhez aotrouniezh ebet a gement he dije e vuhez hec'h anavezet da aotrouniezh reizh.

riez gg., ar vro sellet evel undad levierezhel ha damani en he gwir e-keñver ar broioù all.

Notenn.- En ur yezh resis, tremen hep ober evit ar ster-se gant broad ha stad, pa c'hell mont ez-reizhek meur a vroad (Breizh-Veur), meur a stad (Stadoù-Unanet) d'ober ur riez.

riezel ag., db. riez.

rizez gg., lec'h dindan c'honidigezh ar riz.

rizrann gg., tachennad vro dindan c'honidigezh ar riz.

rotor g., kevran c'hwaldroüs eus un droellrod, ur gener tredan monedona, ur viñsaskell, h.a.

roud g., spiasadur egorel nep elfenn eunennek, neudenn, loc'h, nerzh, h.a., sk.: daou boent lec'hiet a zo a-walc'h evit termenañ ur roud.

roud-gweredif g., (fiz) db. un nerzh, eunenn ma lec'hfe outi ar c'horf, lakaat e vefe an nerzh-se hepken o weredif warnañ.

rouedlestr g., bag-pesketa oc'h ober gant rouedoù.

runieouek ag., db. torosennodur ul lec'h, o c'horvezout e runioù niverus.

sammad g., niver disoc'h ur sammadur; kementad bet dre lakaat e-gevret kementadoù all.

sammadur g., ar sammañ; jedadur sammañ.

sammañ v., lakaat kementadoù d'ober ur c'hementad nevez, sk.: sammañ tri ha pevar a zo lakaat e-gevret an daou kementad-se ha kaout ar c'hamantad nevez seizh; sl.: muj.

samourai g. (Japaneg) ezel eus renkad ar gadourion e Japan hengounel.

saózpoblet agv., poblet gant annezidi a hil saoz.

saon gg., traonienn don ha strizh e-touezh menazioù, sk.: goude difourkañ diouz saonioù Itchang ez a ar Yang-Tse war gamdroenniñ e-barzh div izelenn vras.

sav g., ment an egor, keñverek ouz ar roud anadennel a-zero'h, trade ha diwezhañ ment an ec'honder, sl.: egor.

savadell gg., strollad elfennoù kenframmet, sk.: er pennad-mañ a studiimp gwered an nerzhoù war un nebaut reizhiadoù boss, ar re a gaver ar savadelloù arnodel : neudennoù, nerzhventerioù, poleoù.

saveladenn gg., gwezhiañ savelañ; an disoc'h anezhi, sk.: arnodel e vez bepred saveladennoù ar Fizik.

saveladur g., ar savelañ; disoc'h ar savelañ, sk.: skeul Celsius ar gwreza-verkoù a zo diazezet war saveladur tauzverk ha barzverk an dour.

savelañ v., diazezañ, lakaat da wir, sk.: abaoe 1946 eo bet savelet paralezh an eskemm etre an dolaroù kanadian hag amerikan; kavout spis, didermenañ, sk.: dre hentenn ar vured-vuzuliañ e saveler pouzder ec'honel ar c'haledoù.

savenn gg., unan eus an daveannoù kenserzh, douget war an ehel, lavaret a-zero'h, Oz.

saverezh g., embregerezh sevel; kevran an ijinerezh oc'h ober war-dro sevel ijinennoù, sk.: ar saverezh-listri.

savoniezh gg., kevran al loc'honiezh, studi kempouez ar c'horfoù a-sav.

savoniezhel, savoniael ag., db. savoniezh.

sazil g., en ur viñs, ar c'haran droellek etre troiennoù ar silh.

skar g., en ur viñs, an hed etre div droienn eus ar silh; en ur rod dantek, an hed etre daou zant; h.a.

skarat v. (Brh. scarat, Km. ysgar), distekañ daou dra en doare da zigeriñ ur c'horn etrezo, sl.: korn-skar.

skejad g., gorread-skej, sk.: bezet e mm<sup>2</sup> skejad ar vured e-tal ar spisverk.

skejal ag., db. skejañ; a zo ur skej ennañ, sk.: 3,25 a zo un niver skejal.

skeudenni g., ti arvestoù skeudennel, fivvskeudennoù, h.a.

skeudennel ag., db. pe diwar-bouez skeudenniñ pe skeudennoù.

skeudennve g., lec'h ma reer arvestoù skeudennel.

skeul gg., linenn merket warni derezioù da vuzuliañ egorenañ pe al lun= iadur kenfeuriet anezho, sk.: skeul ur gartenn douaroniezh; feur ul luniadur, sk.: er skeul 1/50 000 emañ ar gartenn-mañ; heul etre anad= ennoù erest dre o c'hefver gant ur skeuliad werzhadoù, sk.: er son= erezh e reer skeul gan, pe skeulgan, aus an heul etre notennoù un oizhavadenn; sl.: skeul-deluniañ.

skeul ar struzh gg., an heul a zo tre an doareoù struzh diseurt diouzh al ledred, sk.: e Japan, evel e Sina, n'aus troc'h ebet e skeul ar struzh: mesket e vez e kreizparzhioù ar vre bleuñvalvezh trovanel ha bleuñvalvezh korreizhat.

skeul-deluniañ gg., (Fiz) e deluniadur egorennec ur ventenn, ar feur etre ar mentadoù deluniet hag an egoradoù delunius; sk.: dre ur sturiadell e telunier an nerzh, ha braster o vezañ divizet e kenfeur gant krefiv= der an nerzh; a-walc'h eo neuze ober gant ur skeul-deluniañ tidel, gant ma vefe deluniet holl nerzhoù an tresadur hervez an un skeul.

skeulenn gg., studad an dereziannoù merket war ur benveg muzuliañ, sk.: skeulenn ar gwrezverker.

skeuliad gg., heuliad gwerzhadoù diouzh ur skeul pe maneged gant ur skeul= enn, sk.: skeuliad ar gwrezverkoù.

skeulindell gg., deluniadur ur ventenn skeuliet, kv.: sturiadell.

skeuliet ag., db. ur ventenn a c'hell bezañ muzuliet dre skoazell ur skeul, dezhi enta ment, hep roud na tu, sk.: ur ventenn skeuliet eo an tolz, kv.: sturiat.

skiantprenadenn gg., deskadenn diwar-bouez ar vuhez.

skingailh s. u.: -enn, kailh metal skinoberiek.

skingailha gg., tachad kondon ma vez skingailh.

skinleviadur g., ar skinleviañ; disoc'h ar skinleviañ.

skinleviañ v., ren a-bell un ijinenn dre wagennañ hertzal, h.a.

skinlevierezh g., obererezh skinleviañ.

skinoberiek ag., a zo ennañ skinoberiegezh.

skinoberiegezh gg., perzh korfoù 'zo da zigevaniñ, o treiñ e korfoù nevez hag o lauskel gremm e stumm skinoù.

skiriañ v., dispenn darc'haf un atomenn e daou pe lies darc'han nevez, sl.: dinevaniñ, skinoberiegezh.

skiriedik ag., db. un danvezenn, tuet da skiriañ.

skiriedigezh gg., oberidigezh skiriañ.

sklentek ag., dezhañ doare ar sklent; o c'hoarvezout eus sklent.

sklos s.u.: -enn, alumetez, enaoudennoù.

skoaziadenn gg., skoazell prl. arc'hant, sk.: a-wezhioù e ro ar Stad skoaziadennoù en eskemm ouzh ur gwir-reoliañ.

skoaziañ v., reiñ ur skoazell prl. arc'hant, sk.: a-du-'rall ez a ar c'hevalaoù amerikan da skoaziañ kenderc'herion nevez a vo o c'hef= ridi divankañ kailhegi ar Stadoù-Unanet o vont da hesk.

skornatradel ag., db. ar stummadurioù douarouriezhel dezouget gant ar skornredennoù.

skorndi g., etrepaouez-skornañ.

sec'hhinat agv., sec'h an hin ennañ.

serzh ag., a-darroz; (Men) serzh emañ un eunenn, ur blaenenn war un eunenn, ur blaenenn all, pa vez par kenetrezo an holl gornioù a luniont en-dro d'o lec'h-kenskañ; korrioù serzh a raer aus havelep korrioù.

serzhenn gg., eunenn serzh war un eunenn all, war ur blaenenn.

seulad g., stummadur douarouriezhel, meinel kalet, plat e c'horre, o tougen stummadurioù all.

seulenn gg., evel seulad.

sez gg., lec'h-diazezh, lec'h-anezh, sk.: sez ar c'hevredadoù bras, annez mondianed Brazil, ez aus war Rio neuz un dinaz a lorc'h hag a land= reantiz.

sidanad g., gwiad sidan.

sidanour g., greantfour e gwiaerezh ar sidan.

